



Embannet gant Skoazell
Kuzul Departamant Penn ar Bed
Kuzul Rannvro Breizh



© Keit Vimp Bev – Loeiza an Duigou
Skeudennoù : Nathalie Almange
© Tous droits réservés – Pep gwir miret strizh
ISBN 978-2-86824-338-6
ISSN : 2552-3546

Lezenn niv. 49-956 ar 16/07/1949 da geñver embanna-
durioù ar re yaouank, kemmet gant lezenn niv. 2011-525
ar 17/05/2011

Loeiza an Duigou

13, straed ar Skav-gwrac'h



2020



*Ur sorserez hon eus klasket
Diw sorserez hon eus tapet
Teir sorserez hon eus staget.*

*Kordennig,
Skoulmig mat,
Kordennig,
Skoulmig start.*

*Tapomp anezho dre o fri,
O blev teñval, o zeod naer
Ha kontomp uhel betek tri
A-istribilh e vo an teir !*

Rimadell hengounel Kerlutig



1

Ur prof dic'h ortoz

Hentoù a bep seurt zo evit mont e darempred gant spered an hetoù. Stlepel ur pezh moneiz en ur feunteun pe diwiskañ ur vleunienn. Karantez, pinvidigezh, brud, barregezhioù evit nijal, pe c'hoazh ar c'hoari video nevez embannet... Erruet eo deoc'h, dija, c'hoantaat un dra gant kement a youl ma pleg ar vuhez dindan nerzh ho hunvre ? Sed aze ar pezh a c'hoarvezas da Sally Poultrouilh.



Ur wech e oa, ha n'eus ket pell zo, un tad ijinour a oa kollet e ijin gantañ, ur c'helenner a gelenne gant strizhder hag ur verc'h divoutin. Honnezh e

oa bugel an diskaramzer.

E don-donañ he c'halon e soñje dezhi e oa bet klevet gant spered an hetoù. Un elfenn dreist-holl, a vouetas he c'hredenn. Pa c'hwezhas dekvet goulaouenn-goar he gwastell deiz-ha-bloaz e serras he daoulagad hag e chuchumuchuas « C'hoant am eus da zilojañ ! C'hoant am eus da zilojañ ! C'hoant am eus da zilojañ ! » Ne verne ket dezhi e vevfe en ur yourt, ur maner pe un tipi. Nann, ne verne ket al lec'h gant ma kuitafe he zi leun a c'hlac'har. Souezhusañ tra : spered an hetoù a asantas reiñ dezhi ar prof c'hoantaet. Pa zistardas he malvennoù, e sonas ar pellgomz.

« Gourc'hemennoù a gengañv », a lâras mouezh yen un noter. Hennezh a gelaouas tad Sally e oa perc'henn war ur rannidi. O paouez mervel e oa moereb Astrida. Dre ma n'he doa ket bet amzer da sinañ an testamant evit reiñ he holl madoù da genstrivadegoù braventez kizhier, ez ae al lojeiz d'e niz.

Setu penaos en em gavas ar re b/Poultrouilh en taksi, o ruilhal goustadik e teñvalijenn Kerlutig, da Wener kentañ vakañsoù an Hollsent.

– 13, straed ar skav-gwrac'h, amañ emañ ! a eslammas ar veleganez, he daoulagad ken ront ha bouloù ping-pong peg ouzh gwerenn ar c'harrtan. Buket e oa he selloù war ar savadur. Iskis,

kozh, tort. Stabilaet e oa gant ur wezenn. Hep ar skourroù ponner, heñvel ouzh divrec'h ur vammgozh o vriata anezho, e vije kouezhet ar mogerioù en o foull abaoe pell.



Al lojeiz uhel a c’hwec’h estaj a oa ar souezhusañ hini gwelet ganti a-viskoazh, evel pa vije bet kemeret mein ur c’hastell marvailhus ha brikenoù marc’had-mat evit sevel ar mogerioù.

Disheñvel-mik e oa diouzh an tier propik a oa a bep tu. Gwelloc’h e vije bet din goulenn ur palez a soñjas-hi, betek kaout skeudenn Moereb Astrida en he fenn, an neuz gwenn-kann hag ar sell rebechus. Trouz ar starderezioù a zassonas er straed didud. Brini a oa pintet war ar wezenn. Pa strakas an nor e tec’hjont en ul laz-krozal diroll tra ma klevas ar gêrioù « Arvar ! Arvar ! » evel ur bromesa spontus. Klemmichal a rejont e mod-se betek erruout e penn uhelañ ar savadur ma azezjont war gargouloù, e doare evezhierien aketus. Ar blenier a savas ur bern gant ar malizennoù-doenn.

En desped d’e zoareoù bleniañ, prim ha trumm, ne oa ruilhet dafar ebet a-hed diribin torgennoù ar c’hoadeier. Arthur Poultrouilh en doa kontet, e ken kaz : ne oa steuziet hini ebet eus ar seitek malizenn. Enno e oa dasparzhet izili e veikanik dre aezhenn, a sache e spered bemdez abaoe eizh vloaz, da lâret eo daou vil nav c’hant ugent devezh, mui pe vui.

O c’hortoz e oa, sonn war ar riblenn-straed, alc’hwez al lojeiz. Un taol-lagad war e eurier-godell a gemennas dezhañ e oant erruet gant pemp munutenn lañs.

Pemp munutenn a oa trawalc’h evit dizo-
leñ trowardroioù ar savadur, a soñjas Sally, en
ur gerzhout en douar gleborek a glaske lonkañ
he botinezoù. Ur vrañsigell a oa bet staget ouzh
skourr ar skavenn-wrac’h. Hejañ a rae drezi hec’h-
unan, en ur wigourat. An arsav diwezhañ a-raok
ar fraost foutouilhek. Jardin frealzusoc’h a veze aes
da gavout.

Pelloc’hik, e oa ken stank struj al liorzha ma
c’helled gwelet stummoù ankenius, par d’an ijin
divent a c’heller kaout da noz. Ne glaskas ket mont
pelloc’h eget lodenn gempenn al liorzha. He spered
ergerzhourez a oa tec’het d’an daoulamm.



Amezegez ar pempvet estaj a oa sañset degemer
anezho. Alc’hwezioù al lojeiz a oa ganti dre ma oa
mignonez tostañ ha nemeti Moereb Astrida. Hir
e oa bet an hent ha skuizh e oa pep hini.

– Dale a zo ganti, deomp tre, a lâras Arzhur
Poultrouilh d’e verc’h.

Evit un den boas da espern e c’herioù e oa chalet
bras, sur-mat, evit distagañ c’hwec’h ger diouzh
renk. E frazenn hirañ, an aliesañ a oa « Ne ‘m eus
ket amzer ». Glaveier puilh, eus ar re a gouezh dre

souezh, a c'hlebias he roched du, ken hir hag ur sae, tra ma tiblegas an aotrou Poultrouilh e zisglavier ramzel, hag ez ejont o-daou dre ar fank, evel pobelaned-noz desachet gant gouloù tomm skignet a-dreuz prenestri ar ranndioù.

Aer ar savadur a oa saotret gant c'hwezh boued doñjerus disoñjet war an tan abaoe un herradig. Ar bignerez strizh a oa re gozh evit bezañ onest, ha suroc'h e oa krapat gant an diri, daoust ma skrijas ar c'hoad da bep pazenn. Diwisket e oa ar mogerioù ha rodelliñ a rae ar paper dislivet. En ur erruout er pevare estaj e kerzhas goustadikoc'h, war seulioù he zad hag a oa savet disfiz ennañ. E foñs an trepas e oa damzigor an nor.

2

An enlojadenn

Diouzh an doare m'en doa da stardañ e garvanoù e komprenas Sally en doa aon he zad rak ranndi e voereb evel m'en doa aon razi pa oa bev c'hoazh.

Dont a reas soñj dezhi o doa faziet estaj, met anv Astrida Poultrouilh a oa skrivet gant lizhiri aour a-us d'ar c'hloc'hig a-istribilh. Ur skritell a lâre *Ki dañjerus 'n eus ket amañ. Gwashoc'h a gavoc'h.* « Pebezh gwrac'h » a huanadas-eñ. Trouzioù boud a oa en diabarzh, kreñvoc'h-kreñvañ, ha mont a rejont tre.

– Degemer mat er gêr, a lâras ur vaouez vinc'hoarzhus, stouet war ur baelon divent, o

fardañ ur pred diwar pesk-strad-mor peurzevet. An amezegez a oa bet o c'hortoz en diabarzh, hag int en diavaez, un treuzkompren laouen. Sevel a reas he lunedoù heol a-zioc'h he fri, d'o lakaat war he c'hlopenn ; ne servijent da netra estreget d'ar c'hiz, ha diouzh he blev fichet e stumm un alarc'h e komprenas Sally e oa ar gemenerez Magdalena Spilhenn-Aour, brudet er vro a-bezh. Gouest e oa d'ober ur sae eured dibar diwar ur sac'h patatez. Niverus e oa ar c'helaouennoù o tiskouez anezhi war o golo.

Pa welas Arzhur Poultrouilh e voe darbet dezhi lezel ar pred da gouezhañ, evel p'he dije gwelet un tasmant.

– Itron ? a c'houlennas Arzhur sabatuet.

– ITRON?! Hopala.. ! N'on ket dimezet c'hoazh met karout a ran an hengoun, DIMEZELL kentoc'h, mar plij ganeoc'h. Grit Magda ac'hanon, me ho ped.

Naetaat a reas he daouarn war he zavañcher mimoza ha kinnig he dorn roufennek d'an aotrou, a bokas dezhi. Dre chañs ne voe ket rediet da lonkañ koan rak achap a reas an amezegez o lâret e teufe en-dro an deiz war-lerc'h, hag oc'h hetañ un enlojadenn laouen dezho. Ne c'helled ket lâret e voe tresoù al levenez war dremm Arzhur Poultrouilh pa weladennas e lojeiz nevez. Mougañ

a reas un huchadenn, zoken, pa 'n em gavas gant poltred e voereb.

Al livadenn divent a skeudenne Moereb Astrida hag he c'hazh, ken fier an eil hag egile. Aroueziet e oa o liamm gant kloc'hig alaouret ar c'hazh a oa heñvel ouzh bravigoù skouarn ar vaouez.

Kerkent e tostaas Sally da sikour he zad. War beg he zreid e tistagas ar stern, d'e lakaat ouzh ar voger en tu kontrol, hag e tistroas ar roz da zivjod kastizet he zad.



Ur c'hazh a lammas war Sally, hag honnezh a zigoras frank he divc'har e doare ur mailh war un domatezenn, hag al loen gouez, rous ha lart, ront evel ur volotenn, a stokas ouzh ar voger hag a simplas. Diouzh e dro-goûg e ouezas Sally e oa anvet Fidelio ha kemer a reas anezhañ etre he divrec'h gant dizampartiz ar plac'hig na voe ket troet war ar poupinelloù biskoazh. Meur a wech he doa goulennet gant an Tad Nedeleg kaout ur pemoc'h-Indez, ur c'hi pe ul lapin, da rannañ karantez ganti.

A-benn ar fin en em gave gant ul loen doñvaet a selle ouzh e vistri nevez gant dispriz.

Ar gward a vire ar ranndi evel un aerouant en ur c'hastell, nemet e seblante dañjerusoc'h.

Sally a zibabas ar gambr heñvel ouzh hini ur roue o vevañ er Grennamzer, gant rideozioù tro-dro d'ar gwele, tapisoù tev hag ur siminal.

Mil boan he devoe da gousket an noz-se tra ma heje he bouloù ping-pong a bep tu abalamour d'ar preder. Ha ma vefen kablus... Nann ! Ne c'hellan ket trelatiñ gant se !

Riv he deveze pa lame he golc'hed met re domm e oa dezhi abalamour d'ar strafuilh. Brezeliañ a rae gant he linselioù. Goulennet he doa kemmoù digant Spered an Hetoù ha Moereb Astrida a oa kouezhet eus he fondalez-diavaez ar memes devezh. C'hoant he doa bet da gaout un ti nevez hag e lojeiz Astrida e annezjont neuze. Ha marc'hataet he doa gant an diaoul hep gouzout dezhi ?

An darvoud ken iskis ha dic'hortoz a oa dre he fazi, a soñje Sally, ha mouget he doa he c'hevrin e kornig hec'h empenn. Spered an hetoù en doa klevet he c'hoant ha kemeret buhez ar voereb kozh en eskemm ! Ne lârfé da zen ebet, dre aon gwelet ar buched o tont d'ar c'hiz en-dro.

He fsikologourez he dije lâret dezhi ne oa liamm ebet etre an darvoud-se hag he c'hoantoù,

ha displeget he dije ur wech ouzhpenn ne oa hunderzh ebet en diavaez d'he fenn. Anavezout a rae ar brezegenn dre 'n eñvor. Met dibosupl e oa dezhi sederaat hag empennañ a rae ar pennad kazetenn a venegfe he drougou :



« Sally Poultrouilh, ur plac'h yaouank hag a seblante bezañ didrubuilh hag eus ar re ordinañ, he deus lazhet he faourkaezh moereb. Da zeiz he deiz-ha-bloaz he deus eskemmet he buhez gant ur prof divent : ur rann di da vevañ ennañ. Diouzh he lavaroù n'he deus ket graet a-ratozh-kaer. Gouzout a reer koulskoude n'eo ket en em gavet diabeg en toull-bac'h.

Mogerioù-tro betoñs dek metrad uhelder, salsifi da bep pred ha dour yen d'en em walc'hiñ a drec'ho, moarvat, war he fallagriezh. An dudi nemetañ he deus bremañ eo krignat hec'h ivinoù ouzh ar speurennoù, da gontañ gant liv ar gwad segmantoù an deizioù bac'het. Eno e c'hell prederiañ tregont loavezh-pad diwar-benn he c'hablusted. »

Silañ a reas he zreid en he c'hofignonoù. Un dra hepken a c'helle diskoulmañ he bouzelloù ankeniet.

Lakaat pop-korn da darzhañ, goullonderiñ ar pod karamel-surentez a oa en he malizenn nemeti ha lonkañ pep tra.

3

Moereb Astrida

« Arvar ! Arvar ! » a drouzas c'hoazh ar brini pa zigoras Sally hec'h abavantoù skrijus.

Dirak prenestr he c'hamb e troidelle ur skourr teñval, lakaet en noazh gant miz Du. Anavezout a rae ar wezenn-se, hini ar sorserezed : ur skavenn-wrac'h. Abalamour d'an delioù pemp biz dezho e veze roet an anv-se moarvat, ha drolik e oa soñjal e oa kozh a-walc'h honnezh evit bezañ douget korfoù krouget lod anezho. Yenijenn an aon a redas a-hed he c'horfig treut. Skeudenn un degad sorserezed o vrañsigellaat e penn ar gordenn a oa en em silet en he fennig.

Evit skarzhañ ar soñjoù kriz-se e tivizas cheñch neuz he c'hambr nevez diouzh he giz. Skritellañ a

reas ouzh ar voger a-dal d'he gwele, ha gant skoa-zell pevar zach amprestet-da-viken digant ar skol, ur poltred familh treset ganti.

En em skeudennet e oa, brasoc'h eget na oa e gwirionez, en he roched du a-us he loeroù hir bannoù orañjez ha bannoù du. A-dreñv dezhi, uhel ha reut, en em gave he zad, gant poullou du-pod tro-dro d'e zaoulagad, ken teñval hag e vlev digempenn. Astenn a rae e vrec'h da lakaat e zorn dindan skoaz ur vaouez treset gant ar c'hreion feltr a implijer evit tresañ ar skorn pe an aezhenn, hag a oa un tasmant gant neuz he mamm.

Dindan he selloù, neuze, en em lakaas Sally da gempenn he gwele. Digeriñ a reas an armel n'he doa ket kredet digeriñ en neizheur. Un eurvad e voe eviti dizoleiñ diabarzh ur pezh-arrebeuri boutin ; dilhad divent d'ober treuzwiskamantoù, ha lod all a vefe kaset d'ar stal eil-dorn. Diblegañ a reas ur stammenn bras a-walc'h da silañ teir Sally enni.

Goullonderiñ a reas ar pres betek kavout ur souezhadenn war an estajerenn uhelañ, etre ur sac'had loeroù gant merk Magda-Spilhenn-Aour hag ur voest leun a gornioù-butun e oa ur c'houfr koad kizellet gant erevent en izelvos.

C'hwezh ar c'habelloù-touseg mesket gant hini ar soufr a hilligas fronelloù ar veleganez.

Un doare den hepken a vire goulaouennoù-koar, podoù gant skevent sourded ha diedoù ken iskis ma veze skrivet « Ampoezon » pe « Koll memor » warno. Sapre Moereb Astrida ! Ral e oa bet an degouezhioù m'he doa kejet outi, ha n'he doa hogozik tamm eñvoren ebet estreget santadur he muzelloù kalet oc'h embann o roudoù ruz-flamm war he zal. Un dibenn-sizhun nemetken o doa tremenet asambles pa oa er skol-vamm c'hoazh. A-ziwar ar pondalez-diavaez o doa stlepet eskern kignez war an dud o pourmen hag ar voereb kozh he doa skrivet an disoc'hoù war un tamm sklent o tennañ gounid eus he c'hozhni evit ouzpenañ poentoù dezhi. Jentil a-walc'h e oa pa veze graet diouzh he mod, ha ma felle dezhi truchañ pa c'hoarient kartoù e oa gwelloc'h da Sally chom hep klask laou. Ne welas ket anezhi ken biskoazh met he mouezh a glevas alies pa bellgomzas-hi d'he zad da skopitellañ rebechoù he doa bet ar blijadur da fardañ.

Bez' e oa-hi eus ar mammoù-kozh a floure o c'hizhier dirak abadennoù romantel, oc'h hirvoudiñ d'ar priñs a lakfe o c'halonoù ken sec'h hag o buspu¹ da dridal en-dro. Gortoz pell, gortoz c'hwerv.

Krabisadennoù ouzh an nor a lakaas Sally da verzout e oa kollet he selloù e foñs an armel abaoe

1 Gwispid.

un herradig. Fidelio a zeuas-tre en ur jorgellat. Treiñ a reas tro-dro d'he ufernoù e doare un eizh difin, o flourañ anezhi gant e vlev stank. Sally a blantas he daoulagad en e re.

– Da vestrez a oa barrek war ar strobinoù, neketa ? Karret em bije deskiñ ganti.

Ne roas respont ebet estreget div dro warnañ e-unan, gant lorc'h He Meurdez a Vro-Saoz, hag e azezas. Selloù flemmus a oa gant al loen. Hag evit bezañ e peoc'h gant he c'houstiañs e ouzhpennas :

– Lakaat a rin bokedoù war he bez.

Gant skoazell ur skubellenn e tirogas ar gweleoù-kevnid a stumme ur volz dantelezet. Ar c'henlojerezed eizhpav a ziskennas e penn o fiseleñoù hag a guzhas kerkent e toulloù ar plañchod. Diboultrennañ, sachañ war ar paper-moger dispeget hag e vountañ en ur sac'h poubellenn, da-heul gant an dastumadeg aeled porselen, setu penaos e tremenas he mintinvezh kentañ er ranndi nevez-kozh. Ul lec'h hepken, na voe ket naetaet ganti, abalamour ma oa aon ganti dizoleiñ an hirgarrezenn deñval dindan ar gwele, rak pehini a c'hell bezañ kuzhiadell un euzhvil ma n'eo ket homañ ?



Divizet he doa prientiñ lein evit he zad. Ken sammet e oa-eñ gant al labour ken e kouske diwezhat-tre, e benn war ar bern patromoù treset gantañ. Diaes e oa dezhañ echuiñ ar C'hounsoner : ar benveg ijinet gantañ da enrollañ da viken an eñvorennoù gwellañ en un doare ken pizh ma c'heller bevañ anezho en-dro gant ar memes from.

Strollañ a reas he blev plat a-us he c'hlopenn gant ur stirenn ha stagañ a reas gant al labour, en ur c'hwitellat un ton berr, a bemp notenn hepken, na oa na penn kentañ na dibenn diwezhañ dezhañ. Evel ul luskellerezh azrec'hus². Dihunet e oa gant ar sonenn-se, c'hwezhet en he divskouarn hep gouzout dezhi gant piv.

Ne gavas nemet ur restad kafe du a strane e foñs un diretenn, hag ouzhpennañ a reas war an daol peurrest he fop-korn a strewas en ur saladennouer, war an doubier gwer kaki. Ha dre ma oa boas he zad da lenn ar c'heleier pa save, e tiskennas ar plac'h gant an diri betek boestoù-lizhiri an trepas degemer, e ken kaz e vefe bet koumanantet Moereb Astrida d'ar gazetenn. Netra. Paperenn ebet. Ma lenne ar gazetenn e veze sur-mat dre laerezh anezhi d'hec'h amezeien. Ha dont a reas soñj da Sally ober ar memes tra. Ar voest-lizhiri a oa e-kichen a zouge un dikedenn skrivet warni « Doktor ha doktoez Van Oplossing ». Silañ a

2 Azregus, nec'hus

reas he dorn treut en toull, met dindan beg he bizied ne santas netra estreget goloioù-lizher hag AIOU ! Lemel a reas he dorn fonnapl. Chignaned dantek a oa stag ouzh he bizied. Kaer he doa hejañ he dorn, chom a raent stag outañ. Diouzh ar pikoù melen war o c'hroc'hen e komprened e oant bet kaset a bellvro.

– Dav eo dit hilligañ o favioù, a zisklêrias ur vouezh a-dreñv dezhi.

Ar plac'h a oad ganti a skoazellas anezhi. Flourañ a reas seulioù al loened ha diskregiñ a rejont a-zoc'h Sally, gwenn-kann. An duardez a zastumas anezho e palv he dorn hag a lakaas anezho en-dro, unan-hag-unan, en o loch teñval.

– Setu ur pej dihegar ouzh ar re a glask montre e boest lizhiri ar re Van Oplissing. Ma mamm zo eus ar re a vale gant un arbalastr en he sac'h-dorn... Pouezus eo d'am zud kaout lizhiri o fraktikoù. Ma rankont en em zizober ac'hanout e vo dav deomp kuitaat Kerlutig. Ne fell ket din dilojañ evit an navet gwech warn-ugent.

– Digarezit ac'hanon, a respontas Sally, mezhus. Amprestañ ar gazetenn a felle din ober, tra ken. Ne glaskin ket ken.

– Anat eo ne c'helli ket ober pikol tra a-benn un nebeud munutennoù. Gwelloc'h e vefe dit

riñsat da zorn gant dour yen ha soavon ma ne fell ket dit gwelet anezhañ o vreinat.

D'ar poent-se e komprenas Sally e oa ordin bezañ iskis, er savadur-mañ, ha plijet e oa gant ar fed-se.

Pa zistroas d'ar gegin e welas an aotrou Poultrouilh, ar bal en dorn, a oa dambleget o tastum tammoù feilhañs dasparzhet war al leur. Ar c'hafe a c'hlebie an doubier hag ar c'hazh, e benn e foñs ar saladennouer a lipe kement bruzhun maiz a oa.

Liv an dipit a oa war dremm he zad. Ar gwashañ ne oa ket e huanadennoù, met e zoare da chom mut. Ne blije ket dezhañ foeltrañ gerioù. Kaozeal a reas dezhi avat, evit menegiñ un darvoud a cheñchfe e vuhez hag hini e verc'h. Amezeg an estaj kentañ, Gary Lipous, en doa prestet kaze-tenn an deiz dezhañ, ha war pajenn ar servijoù en doa kavet ur c'hinnig a glote tre-ha-tre gant e c'hoantoù. Setu petra a oa skrivet er pennad-se :

« En em ginnig a ran, me, an aotrou Bomparquet, evel tigelenner. Liesdoktorelaet on ha boas d'ober war-dro deskadurezh ar vugale. Gouest on da ziwan diwar ar c'hreunenn vihanañ diazezoù ar gouiziegezhioù pennañ hag hollvedel. Bod ha boued en eskemm d'an deskadurezh er gêr, sed aze ma holl amplegad. »

Arzhur Poultrouilh a felle dezhañ gouestlañ pep eilenn d'e Gounsoner, ha Sally he doa hiraezh da zegemer he zigelenner nevez. En em glevout a rejont neuze evit pediñ anezhañ ar buanañ ar gwellañ. Ar veleganez a c'hortozas anezhañ, azezet war diri diavaez ar savadur, oc'h empennañ peseurt doare den e c'helle bezañ. Kement keflusker a gleve-hi a-bell a dremene hebiou dezhi hep arsav betek ma erruas an aotrou Bomparquet gant karr-boutin nemetañ ar sizhun erruet gant un nebeud eurvezhioù dale.

Moarvat e oa tener, jentil ha kalonekaus : un eil tad da dresañ war ar poltred familh. Ar c'hontrol mik-e oa, e gwirionez. Gant nerzh ur sailherez e redas Sally davetañ, met en em guzhat a reas-eñ a-dreñv e valizenn, evel pa vije bet atahinet gant ur glaskerez-bara.

Sal ar gannerez a voe treuzstummet e sal klas. Eno e tibunas an tigelenner e reolennoù d'an deskardez. Dav e oa labourat start, bezañ seven, asantiñ, strivañ, prederiañ, tevel, sevel goulennoù poellek hepken... Ken hir e oa al listenn ma vazailhas Sally, oc'h evezhiañ fiñvoù lezirek bir an horolaj morgousket. Arabat e oa klemmichal, farsal, skroañjal, tabutal, erfin, pep tra a echue gant an dibenn « al ». Aes e oa studiañ e neuz tra ma rae van da selaou, ha kontañ a rae-hi e boentoù boutin gant ar bikez. Tri a oa anezho. E borpant

a oa gwenn ha du, stumm ur pigos a oa d' e fri ha kigennoù ar c'hoarzh a vanke dezhañ.

E fin ar gentel ez eas Sally war ar pondalez-diavaez. Koumoulek e oa an oabl. He c'halon a oa ken goullo ha boest-lizhiri ar voereb kozh. Pegen plijus e vefe kavout un hentenn d'an hude-rezh ! Astrida a oa aet da Anaon o lezel un nebeud bitrakoù e foñs ur c'houfr poultrennek, ur pakad tarot diglok kavet el levraoueg met rekipe strobinell ebet. Koadelier stank a gronne Kerlutig a sachas hec'h evezh. Dont a reas un skeudenn dezhi, hini ur sabad diroll, pelloc'h er c'hoadeier, maouezed o sevel uhel o saeoù, treid noazh o tañsal tro-dro d'ur peulvan. Darbet e voe dezhi koll he c'hempouez tra ma stardas barrennigoù ar pondalez da gemer harp warne.



4

Baleadennoù-noz

Sammet e oa skourr tevañ ar skavenn-wrac'h gant div gordenn solut. An azezenn goad a wigoure gant monedoneoù Sally. Brañsigellat a rae goustadik, seulioù he botinezoù du o flourañ al leton. C'hwitellat a rae ar memes ton hag an derc'hent, ken iskis ma ne oa ket evit lâret e pelec'h he doa klevet anezhañ. A-hed an devezh e trelate gant ar pemp notenn hep dont a-benn da dalañ ouzh ar c'hoant kanañ anezho atav hag adarre.

Met ne oa nemet da eil war renk an darvoudoù divoutin a oa degouezhet abaoe an enlojadenn.

Sally a zihunas ur mintin, gant ar santimant bezañ baleet an nozvezh-pad. Hep gouzout nag an abeg nag an doare. Pa lakaas he zreidig ment

pevar-ha-tregont war ar veketenn, e verzas e oant goloet gant douar sec'h. Sevel a reas he golc'hed : louzet e oa al liñselioù ivez. Dispourbellet e oa he daoulagad o welet roudoù he zreid war al leur etre dor ar gambr hag ar gwele. N'he doa tamm soñj ebet bezañ kerzhed er fank, diarc'hen, an derc'hent.

Heuliañ a reas hentig he c'hammedoù, dre ar saloñs, an trepas, ar pondalez, ar bignerez, betek an diavaez ma oa bet diverket pep roud gant ar glaveier.

An deizioù war-lerc'h e washaas an traoù dre ma oa diroget he c'hroc'hen gant an drez. Bez' e oa douar betek he daoulin.

Hag un hinienn deñval a vestronie he c'horf pa hunvree ? Mennet e oa da lakaat un termen d'hec'h emzalc'h diboell. Pa gouezhas an deñvalijenn war g/Kerlutig e vountas an armel dirak dor he c'hamb. Diskoulmañ a reas kordennigoù rideozioù he gwele grennamzerel hag e lakaas anezho tro-dro d'he ibilioù-treid. Ar mennozh-se ne viras ket outi da droc'hañ al lien gant an dent ha da ziskenn dre ar prenestr. Pelec'h e oa bet ? D'ober petra ? Ur wech ouzhpenn ne oa ket an disterañ eñvorenn en he fenn, met latar ar skuizder a samme anezhi muioc'h-mui.

Aveliñ a reas he fenn el liorz. Ur bank maen a rae an disparti etre al lodenn douzet ha rouan-

telezh ar plant gouez. Kas a rae he zreid ar pellañ posupl war-raok, kouezhañ en a-dreñv, pakañ lañs en-dro. Uhel e save en aer tra ma c'helle gwelet e-mesk ar fraost, e penn pellañ al liorz, toenn dric'hornek ur gabanenn mouget gant an iliaev. Moarvat e oa palez ar c'hevnik, morse ne 'z 'afe eno. Fidelio, en he c'hichen a strane e gof da chaseal ur gelienenn, o lakaat e gloc'hig da stir-linkat. Soñjal a rae dezhi e oa hec'h-unan-penn pa glevas mouezh hec'h amezeg.

– Skoazellañ a rin ganit da c'houzout petra 'rez e-kreiz an noz, en eskemm d'ur c'hementad pop-korn karamel pemdeziek.

Liv al lamponedigezh a lugerne en he daoulagad.

– Penaos e ouiez-se ? a souezhas Sally.

– Ar frond saourus a dremen dre dreuz ar plañchod alies ; ma c'hambro zo just dindan da hini !

– N'eo ket ar pezh a fell din goulenn, penaos e ouiez e valean da noz ?

– Stummet on da verzout kement tra iskis a c'hoarvez tro-dro din. Ma femp skiant a vez war evezh dalc'hmat, dreist-holl pa gousk an holl ha pa sav unan bennak evit mont da bourmen divotoù. Graet em eus ma enklask diwar da benn, a lâras

seder, o kemer harp war gef ar skavenn-wrac'h, he divrec'h kroaziet.

– Divamm, hag hogozik didad, boas da vevañ en da vedig ijinek. Brañsigellat a rez bemdez etre pemp ha seizh eur, en ur ganañ un ton, ar memes notennoù dizehan.

– Chaous ! Studiañ a rez buhezioù da genlojerien dre ar munudoù. Ne ouian netra diwar da benn nemet out kurius-tre. Enklaskerez out-te ?

– Lakomp ez on boas da glask ha da gavout. Er familh ez omp chaseourien euzhviled a rumm da rumm. Ha me 'lâr dit ez eus un toullad anezho e Kerlutig.

Sally a baouezas da vrañsigellat. Talmoù he c'halon a yeas war fonnusaat pa gomprenas e oa sirius-tre he c'hamaradez.

– D'am soñj on milliget peogwir em eus bountet, en desped din, ma moereb-kozh e karri-gell an Ankoù.

– Ken dañjerus a-se out-te ?

– Da zeiz ma deiz-ha-bloaz em boa goulennet un ti nevez digant spered an hetoù ha marvet e oa-hi d'ar memes koulz. Setu-ni amañ bremañ. Ne c'hellan ket mestroniañ ma zreid hag ur sonenn zo krog ennon evel ur c'hrign-bev. Ne zeuan ket

a-benn d'en em zizober anezhi.

– C'ha c'ha ! a c'hoapaas ar chaseourez euzhviled. Spered an hetoù zo ken gwirion hag an Tad Nedeleg. D'am soñj out tapet gant ur c'hleñved denel : ar gablusted. Laouen on da ge-



laouiñ ac’hanout ez eo aet ar paourkaezh Astrida aet da Anaon drezi hec’h-unan. Pe ar c’harma, piv ‘oar, rak ne oa ket ar jentilañ den... Erfin, da valeadennoù-noz zo ur gwir gudenn, ha da bep kudenn ez eus un diskoulm. Tapout a reas e godell diabarzh he chupenn voulouz ur parch a ginnigas da Sally. Honnezh a zirollas ar baperenn duet gant liv ur bluenn.

– Dal, peadra da sinañ.

« Kevrat labour etre Sally Poultrouilh ha Judikaela Van Oplossing, an div o vevañ 13, straed ar skav-gwrac’h, e-keñver kevrin un emzalc’h-noz digomprenus. En eskemm d’ur volennad popkorn pemdeziek betek fin ar vakañsoù, e ranko an implijiadez reiñ un doser d’an diwezhañ-tout da zeiz an distro-skol, o venegiñ an abegoù. Ma ne vez ket doujet ouzh ar gevrat... hag all hag all ». Sally a sinas e doare he zad, da lâret o skrivañ hec’h anv familh en un doare luziet ha dilennus, pa daolas evezh ouzh ur steredennig e dibenn ar bajenn a ambrouge ur skrid bihan tout. Edo o paouez prometiñ he botinezoù, dic’houzvez dezhi, ha mousc’hoarzh Judikaela a yae d’ur skouarn d’eben.

– A-du ganit. Re aes eo touellañ ac’hanon, a respontas Sally tra ma stardjont o dorn, e doare embregerien o tonkañ ar marc’had.

– An darempredoù micherel ne viront ket ouzhimp da vezañ mignonezed, hañ ?

– Ma c'hellan kaout fiziañs ennout, tamm ebet, gant plijadur, eme Sally.

– Pedet out er gêr warc'hoazh da noz. Ma zud a vo laouen da zegemer an amezeien da goan an Hollsent ha c'hoant o deus d'ober anaoudegezh gant da dadoù.

An aotrou Bomparquet ne c'hell ket bezañ ma zad. Sur on e red binim dre e wazhiennoù. Morse ne garo ac'hanon. N'he doa ket respontet ma oa achapet Judikaela, oc'h ouzhpennañ :

– Dav 'vo deoc'h dont treuzwisket !



5


Koan an Hollsent

Souezhet e oa Sally o tizoleiñ an doare iskis m'oa doa annezidi Kerlutig da lidañ gouel Halloween.

E armel Moereb Astrida he doa kavet ur roched gwenn, ken hir warni ma oa evel un hiviz-noz. Troc'het he doa an danvez deuet da vezañ melen gant ar gozhni, ha kempennet al lodennoù debret gant ar preñved. Pa droe e save uhel an danteleziou skañv. Hiraezh he doa d'ober anaoudegezh gant an amezeien, ha kaout respontoù digant hec'h implijadez nevez.

Ur ruz-muzelloù he doa kavet e foñs tiretenn armelig ar sal-dour, hag e frotet he doa dindan he daoulagad da lakaat da grediñ he doa leñvet gwad. Lorc'h a oa enni gant he zreuswiskamant,

daoust ma vabouze an dremmlivaj ha ma tlee diwall da guzhat mat he re botinezoù dindan ar sae, hep kerzhout warni kennebeut. Heñvel e oa neuze ouzh ar plac'h yaouank a weler, hervez ar vojenn, o vale a-hed, gwenn penn-kil-ha-troad, hag a ziheñch ar veajourien.



Arzhur Poultrouilh en doa disoñjet lakaat un treuzwiskamant, met ne oa ket pikol tra evit un den a zisoñje en em vagañ ha mont da gousket. Graet en doa aon d'an holl koulskoude hag en desped dezhañ. P'en em kinnigjont er sal ma oa strollet ar gouvidi, e voe yen an degemer. Pe kenkoulz lâret, sklas. Ar sonerezh a baouezas hag ar flaperien en o zreuswiskamantoù liesliv a davas, o selloù a-dreuz. Skeudenn difiñv neuizioù spontet.

Arzhur Poultrouilh a reas ur c'hammed da saludiñ e amezeien.

– Mallozh deomp ! a estlammas unan.

– Viktor Valerius ! a hopas eben.

Hag un trede a semplas. Honnezh a voe astennet war ur gourvezvank, an divc'har er vann da gas gwad d'he fenn. Un diroc'hadenn a zassonas ha distenn a reas an holl. Netra c'hrevus.

Boas ma oa da chaseal an euzhviled he doa tapet an itron Van Oplossing tapet hec'h arbalastr-sac'h-dorn hag e buket war-zu Arzhur Poultrouilh. An aotrou Van Oplossing a oa en em daolet ouzh e dreid evit herzel outañ da fiñval. O seizh merc'h, holl heñvel ouzh Judikaela nemet e oant evel poupinelloù Rusia, bihanoc'h-bihanañ, a zalc'he ur roued da dapout ar preizh.

Tad Sally avat ne voe ket feuket. Sur a-walc'h

ne voe ket ar c'hentañ tro ma c'hoarvezas seurt darvoud dezhañ. Magdalena Spilhenn-Aour ivez a oa bet souezhet o welet anezhañ, ar wech kentañ. Seblantout a rae kompren abeg ar spont met Sally ne ne oa ket evit intent c'hoazh. Arzhur Poultrouilh a reas ur soubladenn gaer hag ur mousc'hoarzh lufrus. Gouest e oa d'en em ginnig gant doareoù seven. Lakaat a reas ar gaoz war gaerder ar saloñs, gant meurdez ar piano ha kinkladurioù garlantezioù kignen, kement ma plijas d'an ostizien. Faziet e oant. Flouret en doa lorc'h ar re Van Oplossing.

« Yec'hed mat » a lâras an holl en ur strakal o gwerennoù.

Prestik e oa en em vodet an dud ouzh taol. Skañv e oa an aergelc'h ha ponner ar chervad. War un daol goad hir a bemp metr en em lede meuzioù a vil-vern. E keit-se e oa an aotrou Bomparquet ouzh ar piano o seniñ ur vals entanet.

En ul luch-lagad he doa merzet Sally ne glote ket he zreuswiskamant gant spered an nozvezh.

Edo Magda Spilhenn-Aour, dindan tresoù ur gorriganez bling-bling, o lemel an daeroù-gwad eus he dremm. Stardet e oa ouzh he bruched. Ken tost e oa outi ma kleve he frond, na oa nag hini ar roz nag hini ar patchouli, met hini un dourenn gimiek, tostoc'h da c'hwezh ar gwinegr.

– Ha setu penaos e treuzstummer un itron wenn en un aelig koant ! a estlammas-hi. Amañ ne farsomp ket gant ar marv, er c’hontrol e lidomp al levezeg par ma c’hellomp, ra tarzho al livioù e teñvalijenn emlazhus an diskaramzer. An hengoun eo.

– Piv eo Viktor Valerius ? a c’houlenas Sally. War a seblant e ra aon d’an holl.

– An den gwashañ hag en deus bevet amañ, ha da dad a denn kalz dezhañ, a zisplegas Judi dezhi. Hennezh a oa un dug a blije dezhañ jahinañ en ur gemer e verenn-vihan. Pediñ a rae kantadoù a sorserezed tro-dro dezhañ da gemer perzh en e dorfedoù.

A-daol trumm e komprenas Sally perak e oa stegnet an darempredoù etre Moereb Astrida hag he niz : a-viskoazh o doa bet aon an eil eus egile.

– Setu perak e lider Halloween en tier, a ouzhpennas-hi. Bugel ebet ne gred bale er straedoù da c’houlenn madigoù. Ha setu perak ez eus treuzwiskamantoù bleunioù ha boudiged war bep hini ac’hanomp.

– Ganet eo an diaoul e Kerlutig. Ha genel a raio en-dro, eme Gary Lipous, amezeg an estaj kentañ. Un deiz bennak e tistroio. Ne ouiomp ket resis pegoulz. Met tonket eo an annezidi da vevañ

gwashañ milligadenn. Dañsal betek trelatiñ ha mervel gant ar follentez. Plinn an ifern a c’hortoz ac’hanomp, tudoù !

– Raktresoù all am eus er vuhez, a respontas Judi dindan selloù diasur hec’h amezegez.

– Setu perak e kinnig an Asurañsoù Lipous un distaol...

– N’eus ket da vezañ chalet, a droc’has an dok-torez Van Oplousing. Ur Yann-Gerbennak e oa an den-se. Debret eo bet e gig gant ar preñved tri c’hantved ‘zo. Soñj’ a ra dit ez eus ur bern eskern flastret dindan un donenn zouar o c’hortoz ar prantad gwellañ evit kastizañ ac’hanoc’h ?

– Pep bugel desavet e Kerlutig en deus bet klevet e istor. N’eo ket bet adkavet e benn bis-koazh, eme Magda Spilhenn-Aour.

An holl a dasas da heul hec’h evezhiadenn, ar c’hoarezed a baouezas da stlepel piz bihan an eil war eben, hag un avel-sil yen a fiñvas ar rideozioù voulouz.

– Gant ur penn hepken ne raer ket pikol tra , eme Gary Lipous en ur naetaat lipig e asiedenn gant un tamm bara. Setu ar pezh a lâran alies d’ar pratikoù a gemer un asurañs tokarn marc’h-houarn hep soñjal el lodennoù all. Koulskoude e ranker kemer e kont un elfenn all... digarezit ac’hanon

Itron hag Aotrou Van Oplossing ma vezan dichek, met setu ma ali : an dug Viktor Valerius a oa karet gant ur sorserez. Soñjit 'ta, ma vefe ganet ur bugel desavet gant ar gefridi da seveniñ c'hoant an tadig, hag en defe bet diskennidi d'e dro... Kavout a rafent an doare d'e lakaat da zistreiñ !

– Diskaret eo bet pep hinienn arvarus. Milligadenn Kerlutig nend eo nemet ur vojenn.

Devet eo bet maner an dug ha kement sorserez a veve eno. Pulluc'het o galloud gant ar peurrest. Pep pajenn Agripa zo troet e ludu. Ha bremañ, ne chom nemet kredennoù... Met sanket int don er speredoù gwan, gant kement a nerzh ganto ha dent ar suner-gwad e goûg ar paourkaezh preizh.

An aotrou Bomparquet a grogas gant sonenn-gañv Chopin.

– Perak gwelet e pep kourmoulenn un diougan marvel ? emezañ war-zu Magda-Spilhenn-Aour.

– Ijinañ ar gwashañ evit talañ aesoc'h ouzh an droug p'emañ en hor mesk... Setu ar pleg a ranker kaout o vevañ amañ.

– Un dra zo sklaer evel lagad an naer, a eilgerias Gary Lipous : pa vez noz eo gwelloc'h chom er gêr.

An div gamaradez a c'houlennas an aotre da
guitaat an daol da c'hortoz dienn-skorn an di-
benn-pred. Ur gaozadenn brevez a felle dezho
kaout.

6

Disentus

Sally a gemeras ar podad pop-korn da reiñ d'he c'hamaradez. D'enderv e oa bet gant he zrotine-rezh betek an ispisiri dostañ da brenañ maiz. He mignonez a gemeras ur sac'h-kousket en hec'h armel hag en e greiz e kuzhas ar pod. « Peadra da gas ganin pa vin pinijet » a lâras Judikaela.

Diaesterioù he doa Sally da gompren he doareoù. Liesseurt e oa o disheñvelderioù. He c'hambred e oa hini ur wir chaseourez, desavet da renkañ pep tra, da ziverkañ pep roud. Ne oa ket an disterañ pleg war he gwele. Sally a daolas he fouez warnañ. Goullo e oa he c'hambred, hогоzik, gant pezhioù-arrebeuri aes da staliañ-distaliañ evit dilojañ, mont d'ur gêr d'eben da redek war-lerc'h kevratoù chaseal euzhviled.

– Marteze ez eus ul liamm etre milligadenn ar gêr ha ma fourmeden... nennoù... ma fourmenadenn. Oc’h ! ma baleadennoù, a zeuas a-benn da zistagañ. Mall zo warnon da lakaat un termen dezho. Ar mintin-mañ e oan dihunet gant kabel-loù-touseg etre ar bizied treid. Soñj ‘ta. Petra ‘rastellin fenez ?

– Netra, a respontas Judi. Mod pe vod e kavimp an diskoulm.

Dirodelliñ a rae he rodelloù etre he bizied o prederiañ.

– Gellet ‘poa heuliañ ac’hanon dec’h ?

Siwazh... pas. Klasket em boa met lakaet em boa un alarm da seniñ. Ma zud zo sot gant ar surentez. Liesseurt eo o enebourien abalamour d’o micher. Ar sizhun paseet e oa bet ur gorgonez o klask laou abalamour ma oa bet diskaret he c’hoar gant ma zud. Staliet o deus alarmoù e pep lec’h er rannidi. Ha gwashoc’h c’hoazh eo abaoe ma ‘z eus kaoz eus Viktor Valerius. Trubuilhet int evel an holl, daoust d’ar pezh a lâront. Tostaat a reas ouzh dor he c’hambur war beg he zreid.

He c’hoarig, ken heñvel ouzh ar re all ma oa tost dibosupl lâret pe hini e oa – ar pempvet hini moarvat – a voe tapet o selaou a-dreuz an nor.

– Kerzh kuit ! a urzhias war un ton efedus.

Lakaet o deus ma c'hoar war ma chouk. Pa lâran dit int sot. Da noz ez enaouont pep alarm ha ne c'heller ket ober an disterañ kammed hep bezañ evezhiet. Lakaat a reont pejoù e pep lec'h. Ijin 'ta pejoù bleiz, dasparzhet e pep lec'h en trepas, ha mekanikoù semplañ ouzh ar mogerioù. Arvarus-tre eo dihuniñ gant ar c'hoant mont da Gersoulaj zo arvarus-tre. Da neizheur e oan en soñj heuliañ ac'hanout en ur dremen dre ar prenestr ha diskenn war-bouez ur brank, met prenet o doa anezhañ gant ur chadenn ledan, ha lakaet ur c'hadranas na oan ket deuet a-benn da zizober. Met gwelet em boa ac'hanout, dre ar werenn, o kerzhout evel ur zombi. Dre chañs memestra em boa gellet heuliañ ac'hanout gant ar gevellunedoù. Steuziet e oas el liorz, etre ar skav-gwrac'h. Ha siwazh deomp, el lodenn ken gouez ma ne gred hini ebet mont.

– Ur mennozh 'peus eus ar pezh a c'hellan ober eno ?

– Ne ouian ket re vat. Ne vez den o vont eno. Al liorzhour zoken en deus dilezet e labour, achapet hep rannañ grik. Met diwar da zoare da gerzhout e oa anat e oas o vont davit un dra resis.

– Pe davet un den resis, a eilgerias Sally. Bez' e oan war ma zrotinerezh pa 'm eus bet soñj eus peurrest an ton. En em lakaet on da ganañ. Pozioù a zo deuet din en un doare boutin, dre forzh klevet

anezho moarvat.

« *Deuit 'ta, Tostait 'ta, poent eo kregiñ.*

O tistreiñ emañ ma mistri... »

– Mmmh. Ur ganaouenn evit gervel ha desachañ. Tuchantik e tizoloimp pep tra.

– Diaesterioù hon do, Judi... Disoñjal a rez ez out stanket emañ abalamour d'an alarmoù.

– Foei ! Ur plac'h on-me a-vicher. Setu ar steuñv : emañ o vont da lakaat ma c'herent da fuloriñ. Kaset e vin d'ar C'horn, aesoc'h e vo evit mont kuit avamañ. Da greiznoz e teui da zieubiñ ac'hanon hag e tizoloimp lodenn guzh al liorz.

– Da zieubiñ ? Penaos 'ta ?

– Ar C'horn zo er c'hav, e loch ar familh. An niverenn 23 eo.

– Da gerent zo tener-tre war a seblant, a respontas Sally en ur gemer eilskouer an alc'hwez a ginnige dezhi he c'hamaradez.

– Kastizoù ar re Van Oplossing n'o deus ket o far. Penaos e teuer da vezañ chaseourez euzhviled hervezout ? O lenn ur gontadenn bemnoz a-raok kousket ?

Da gentañ ne vefe ket fall termeniñ petra eo un euzhvil, a soñjas Sally.

O paouez klevout un trouz e oa, nepell en trepas, unan tost d'ar re a reer gant ar c'hof war-lerc'h ar pred. Divskouarn kurius a selaoue anezho adarre. An taol-mañ e oa ur c'hoar all, an trede hini moarvat rak brasoc'h e oa eget eben.

– Petra 'peus klevet ?

– Pep tra.

Judi a gemeras pod-espenn he burev hag a lamas ar bont. Peziou moneiz a gouezhas e palv dorn he c'hoar.

– Ha bremañ ?

– Netra.

– Dispar. Diskouez a rafes d'an holl gouvidi penaos out gouest da leñvañ ? Ezhomm 'm eus bezañ kastizet.



7

Luskellerezh ar sabad

Evel-just, n'he doa ket graet Sally graet hervez kuzulioù hec'h amezeien. War-lerc'h ar pred ne oa ket chomet bac'het en he ranndi.

Dibabet he doa, kentoc'h, diskenn d'ar c'hav, o moustrañ war hec'h ijin evit gellet lakaat un troad dirak egile. Pebezh milendall ! Bep tro m'en em gave e penn un trepas hag e oa dav dezhi stouiñ ar penn a-gleiz, a-zehoù, da zibab un trepas all e krene, aon ganti da zizoleiñ, dindan skeud lentik he lutig, stumm un euzhvil o c'hortoz anezhi. Trouzioù didermenapl a lakae talmoù he c'halon da fonnusaat. En em rediet e oa da zoujañ da ziv reolenn : chom hep treiñ kein, kenderc'hel atav gant he hent, ha chom hep huchal.

Mogerioù ar c'hav a oa heñvel ouzh peurrest ar savadur dre ma oant diroget gant frailhoù, toulloù-du ma oa en em gollet sekredoù ar c'hantvedoù paseet. Bez'e oa mein ken kozh ma oa kizellet enno gerioù en ur yezh ankouaet.

'Benn ar fin e c'halvas Judi, o kontañ warni evit he c'has daveti. Al lochoù a oa niveret en un doare iskis p'en em gave al loch 4, etre ar 7vet hag an 30vet hini. A-feur ma kerzhe en em strolle ar razhed war he seulioù. Bezañ ambrouget a sikoure anezhi evit mont war-raok, tra ma kane, evel ma oa boas d'ober pa oa stegnet betek re. Kanañ a domme he c'higennoù, a lakae anezhi da analiñ en un doare reishoc'h, ingaloc'h. Teurel ar memes notennoù ha da gustum, ken sanket ma oant enni.

– Amañ emañ ! a glevas oc'h erruout dirak an nor c'hoantaet. En ul loch ma lakaer alies bitrakoù torret, dafar ar c'houlzioù-amzer all, erfin, ar pezh ne servij ket mui, e oa ar verc'h Van Oplossing. Hec'h-unan-penn gant pevar c'horn.

– Degemer mat er C'horn. Lec'h m'eo teñval an imor ha kalet al leur...

Ur strakadenn-dor a gelaouas anezho e oa un den all er c'hav. Sally a lazhas he lutig. Analadenn domm Judi a hilligas he skouarn.

– Arabat deomp bezañ tapet, a chuchumu-

chuas-hi. War a lavarer e c'heller mont er-maez
eus ur milendall en ur zibab unan eus an div voger,
ha mont war-raok dalc'hmat o ruzañ an dorn
warni. He dorn dehoù a voe tapet gant dorn kleiz
Judi, hag e pellaont diouzh trouz ar c'hammedoù



all, betek erruout d'an diri a gase da rez an douar.

– Ne 'z peus ket c'hoant da c'houzout piv e oa ?

– Ma c'hoar, da dad, ma zud, piv 'oar. Unan bennak a zo deuet da glask ac'hanomp, ha ma vije deuet a-benn n'en dije ket asantet lezel ac'hanomp da zizoleiñ sekredoù al liorz. h.



Lec'hioù 'zo a cheñch neuz gant an deñvalijenn, a soñje Sally o kerzhout er fank.

Son izel ul luskellerezh, c'hwezhet gant ar struj kevrinus, a c'halvas anezhi.

– Klevout a rez ar sonenn ? An hini a c'hwitellan atav.

– Ne glevan netra. Marteze out sot.

– Marteze out bouzar, a respontas Sally.

« *Deuit 'ta, Tostait 'ta, krogomp e-barzh*

Ha dañsomp 'ta, da vezañ trec'h warc'hoazh »

Ne oa nemet dek kammed d'ober evit en em goll e stankter an drein flemmus. Marvailhoù al liorz. h a oa aet da netra gant gouloù an deiz, hag

ar gwez, na oant ket ken habask ken, o tispakañ o skourroù da vezañ kuzhiadelloù niverus speredoù teñval. Eus kalon ar fraost e terede ar sonenn, ken dous dezhi hag ur flouradenn.

Alies e lâre he zad dezhi ne oa ket poellek kaout aon eus an noz, met klevet ur vouezh dianav dezhi o tesachañ anezhi kement ma ne c'helle ket talañ, a oa poellek marteze ?

Nann, frealzusoc'h e oa chom en tu mat eus ar geot touzet berr. Ha furoc'h ivez. Met da hanternoz ne oant ket fur ken.

Hep prederiañ e tremenas hebiou ar vreañsigell, e treuzas ar vevenn d'en em reiñ da rouantelezh ar plant diroll. Gwriziennet-mat e oant, amzer o doa bet da anneziañ donderioù an douar.

Goustadik ez eas-tre er fraost, hag e plegas, hag e tistennas, tra ma klaske ar skourroù pokat dezhi. Divent e oa an drein. Heñvel ouzh eskern sec'h. Didruez ivez.

An taol-mañ, nebeutañ he doa ur re votoù kalet laset mat tro-dro d'he daouufern. Splannoc'h-splannañ e oa mouezh ar galv, tommoc'h eget traezh an hañv. Etre kefioù zo e spurmantas ur flammenn. Ar pal da dizhout ! Sevel a rae uhel he zreid, da flastrañ ar plant skoulmet a eztaole skilfoù ken lemm hag aotennoù. Skourjezet e oa

dremm Judi, kement hag he hini. Perlez gwad a zerede eus he muzelloù diroget. Blaz an houarn.

Degouezhout a rejont dirak ur savadurig gotek. Ar gabanenn a weler pa vran̄sigeller uhel en oabl ! Met souezhusoc'h a oa, rak ar merc'hed en em gave tal-ha-tal gant ur spontailh bev. Ar flam-menn a oa hini ur c'houlaouenn-goar, goeñvet he skeud, e-kreiz e benn sitrouilh. Un tog denjentil a oa pintet warnañ. Kavet o doa ar c'haner, ha ne ehane ket da ganañ. Klok e oa ar sonenn.

« Me 'gan ma-unan, biskoazh kement all

Da zerc'hel soñj e oan sorser leal...

Pa oa en e sav ar maner

Me oa servijer a-vicher

Alejañ died ar yaouankiz

A raen evit disterañ priz

Rak mousc'hoarzh kaerañ ma mestrez

E oa kalon ma levenez

Kan a ra al labous en ur yezh all

Hag ar gweez ne reont nemet diroc'hal...

Met lâret he deus din al loar

E vo eus ar sabad dibar

A-benn disadorn pe disul

Brasañ koroll ha kuzul

Ma vo lakaet tan en oaled,

lidet frankiz an euzhviled !

– Klevet a rez anezhañ bremañ ? eme Sally, dispourbell he daoulagad. He mignonez a oa badaouet gant al luskellerezh. O vazailhat e oa.

Deuit 'ta, tostait 'ta, poent eo kregiñ.

O tistreñ emañ ma mistri...

– Digarezit ma troc'han ho c'hwitell, Aotrou Spontailh, met, piv eo ho mistri ? Ha pedet on ivez d'ar sabad ? Perak e klevan ac'hanoc'h ? Ha perak e vezan strobinellet gant ho lavarou ?

– Dibab mat da c'houlenn, ne respontin ket da

unan ouzhpenn. Ne 'z peus ket merzet eo goullo ma fenn ?

An toulloù tric'hornek a rae e zaoulagad a sklêrijenne anezho. Judi a oa kroget da vont war he daoulin. A-benn nebeud e serrfe he malvennoù. Sally a hejas he skoaz goustadik d'he dihuniñ. War-zu an aotrou Spontailh e c'houlennas.

– Perak e komprenan ac'hanoc'h ?

– Peogwir out bugel an noz.... Deomp da c'houzout ma 'z out raden pe roz :greomp an arnodenn, diskouez da zent.

Digeriñ a reas he beg, ar brasañ ma c'helle, evel pa veze e ti an dentour.

– N'int ket lemm a-walc'h da lakaat gwad da strinkañ. Penaos en em santez da vare an nozioù loargann ?

– Re enervet evit gellet kousket.

Pa gomprenas stêr gwirion ar goulenn-se e resisaas ne c'houzañve treuzstummadur blevek ebet.

– Ur sorserez out-te, neuze. A zo sorser pe sorserez an hinienn a zo perc'henn war ul levr strobinell. Un den bennak en deus dibabet ac'hanout. Dre al lid anvet « Pok ar sorserez » out bet títlet evit bezañ hêrez an Agripa war-lerc'h e varv.

Poan he doa kavout ur stêr d'an darvoudoù.
Debron he doa en hec'h empenn.

– Unan bennak tro-dro dit en deus lakaet en
e soñj fiziañ al levr-familh ennout, a resisaas ar
spontailh.

– ...Al levr...

– Un oberenn gant follennoù leun a arouezen-
noù graet da vezañ lennet. Ne 'm eus ket amzer
ken, evit ar gaozeadenn, rak karget on bet d'ober
ar c'halvadenn.

– *Pintet ma frouezhenn war ur penn bazh*

pa oan gwechall diouzh stumm ur gwaz

Evezhier on bet hag evezhier on c'hoazh, a gen-
dalc'has Spontailh.

– Pok ar sorserez. Pok ar sorserez...Moereb
Astrida ! a estlammas Sally, Gwir eo he doa bitra-
kouè ar vicher. Ar c'hazh, ar goulouennnoù-koar,
an diedoù.

Judi a lakaas he dorn war he skoaz :

– Ma... keloù mat : gounezet ez peus un
Agripa, gant e skoazell e c'helli ober strobinoù
dibar evel ur gwir sorserez ! Keloù fall bremañ :
setu m'emaout war roll enebourien ma zud. Keit

ma ne ouiont ket out sorserez, ne 'z peus ket da
vezañ chalet. Met piv 'oar ; Ma vez graet ur gevat
war da benn e klasko ma zud seveniñ o labour.
Evito eo evel pa vefes e skipailh Viktor Valerius.
Un euzhvilez.

An agripa

An aotrou Bomparquet a oa tomm ouzh ar reolennoù. Karout a rae anezho dreist da bep tra.

E vicher a blije kalz dezhañ dre ma c'helle sentiñ d'an urzhioù, ha sentiñ d'an urzhioù a dalveze doujañ da reolennoù e vestr. Ar c'hoant seveniñ e garg a oa bet trec'h war e c'hoant kousket.

En em douellet e oa Sally o soñjal e c'helle kuitaat he rann di hep kaout trubuilhoù gantañ.

An div blac'h, en desped ma kerzhent war beg o seulioù, en em gavas dirazañ hep abeg ebet.

Gortozet en doa anezho war hent an distro. Marc'hata gantañ a oa dibosupl.

E giz-se e verzas Sally an diforc'h etrezañ hag

ar bikez : hennezh a oa gouest da vousec'hoarzhin.

Laouen e oa an aotrou da gaout un digarez da vezañ strishoc'h eget boaz. Ne oa ket plijadur brasoc'h evitañ eget lakaat bugale disentus da blegañ.

Hep rannañ grik e kasas anezho d'ar saloñs.

Tro-dro d'ur banne te mokedus ha d'ur pladad gwastilli en em gave an aotrou Poultrouilh, an itron hag an aotrou Van Oplossing oc'h ober kenstrivadeg an neuzioù vil. « Trugarez da vezañ kelaouet ac'hanomp » a lâras an Itron, uhel he groñj. Dindan he mantell e oa he gwiskamant micherel, ur pezh dilhad pegus heñvel ouzh ar re a servij da splujañ. Moarvat e oa bet o chaseal an noz-mañ. An aotrou Bomparquet a reas ur soubladenn direbec'h he stumm. Lorc'h a oa ennañ.

Al loar a voe test eus fromoù damheñvel an div blac'h yaouank. An hevelep kastiz a strakas evit pep hini. Ur plañchod a zispartie anezho met an nec'hamant o liamme. « Difennet groñs gwelet, komz, kaout darempredoù gant eben ». Ha c'hoazh, kerent Judi o doa kavet ur binijenn gwa-hoc'h eget ar C'horn. Betek he zriwec'h vloaz e oa arabat dezhi kaout mignoned. A-us he fenn, er pevare estaj, e oa kondaonet Sally da chom bac'het en he c'hamb'r kerkent hag echu ar c'hentelioù. An aotrou Poultrouilh en doa asantet kinnig an tigelenner : sammañ Sally gant al labour e oa an

diskoulm evit he lakaat da cheñch emzalc'h.

Ya, an aotrou Bomparquet a vourre an urzhioù dre ma c'helle, ouzhpenn da sentiñ, ezteurel e aotrouniezh war piramidenn ar galloud.

Da c'hwec'h eur mintin, neuze, e lakaas anezhi da redek er c'harter. Ar straedoù, kousket c'hoazh, a oa goloet gant ar vrumenn. Aezhenn a achape eus he genoù pa boanie da gas un troad dirak egile. « MA-LI-GORN » a zistage e vouezh kriz pa glaske Sally tapout hec'h anal en-dro.

« Da betra klask lakaat an empenn da dreiñ ma 'z eo blot peurrest ar mekanik ? Ken blot hag ur maligorn hag a vije gwell dezhañ kuzhat en e grogenn. »

Seul vorodusoc'h ar poelladennoù, seul efedusoc'h e vezent. Poellegezh tort.

Met petra a c'hell un den drouk pa ouier ez eus un Agripa leun a strobinoù doc'h ho kortoz ?

Ur wech an amzer e taole ur sell ouzh an estajerenn. E-mesk al levrioù renket diouzh urzh al lizherenneg ne oa Agripa ebet. Gortoz a reas dibenn an devezh evit gallet kenderc'hel gant he furchadennoù trankilik e pep korn ar ranndi.

Klasket he doa e pep armel, ha dindano, hag a-us dezho. Roet he doa taolioùigoù war pep

moger da c'houzout ha kuzhet e oa eno, lakaet ar penn e diabarzh gourlañchenn ar siminal, goulennet gant Fidelio... Disoc'h ebet !

Dindan selloù hec'h evezhier e kendalc'has da zuañ paper, c'hoazh hag adarre. Goloet e oa he bizied gant klogorennoù. Droug kein he doa ha kaletaet he feskennoù o vezañ azezet war ur gador reut. Rak hervez an aotrou Bomparquet e oa ar c'hadorioù klet enebourien striv ar spered. Poaniañ a oa deskiñ.

Pa soñjas dezhi erfin, e c'hellfe mont dre-guzh da adkavout he c'heneilez war ar vranñsigell, e kouezhas ar ger spontus : « REIZHSKRIVADENN. » Ha Sally en toue, a vouezh izel, en em zizober dioutañ p'he defe an disterañ galloud hud ! Treuzstummañ a rafe anezhañ e maligorn... aozañ a rafe redadegoù gant ar blijadur d'e welet o ruzañ en e vabou. Stagañ a reas hennezh da lenn pennad ar geriadur :

« Ar maligorned, a vez graet anezho ivez melc'hwed-krogennek, a zo blotviled koftroadek sammet gant ur grogen a servij da zi dezho. Bale a reont goustad-tre a-drugarez d'o mukus, un dourenn c'hludek. Peder mourrenn o deus, hag an div vrasañ anezho zo daoulagad warne pa vez kizidik an div all d'ar c'hwezh ha d'ar blaz. Dre o radula, un doare teod goloet gant dent, e valont o boued. Ma vez flastret o c'hrogen e c'hellont

produiñ mukuz da stagañ en-dro al lodennoù drailhet, gant m'eo pell a-walc'h eus o apeks...»

Deuet e oa a-benn da vougañ he menn. Lonkañ a reas ur soubenn divlaz ha mont a reas da gousket. Ar c'hwervoni a lakaas an daeloù da c'hlebiañ he divjod ! Pebezh euzhvil ! Ha soñjal a reas en-dro el lec'h nemetañ n'he doa ket kredet ober ar c'hempenn p'he doa aozet he c'hambri diouzh he c'hoant, aon ganti da gavout un euzhvil.

E ken kaz, e taoulinas hag e savas ar c'holc'hed da deurel ur sell. Bez' e oa ur c'houfr chadennet. Ken ponner hag hi e oa moarvat rak mil boan he devoe d' e sachañ betek enni. Ur red tomm a dreuzas anezhi pa douchas ar chadenn. Ur c'houfr ne oa ket. Skubellañ a reas gant an dorn al loustoni stag ouzh krec'hin tousegi gwriet a yae d'ober golo an Agripa. Ar chadenn a briatae al levr a oa heñvel ouzh ur boa houarn. Steuziañ a reas pa anavezaz daouarn Sally.



« Ne sentan da zen estreget d'ar sorserez a zo mestrez warnon. »

Ar bromesa a ginkle ar golo a enaouas tan ar guriusted e kof Sally. Bountañ a reas an armel,



a bouez nerzh, da stankañ an nor. Evit bezañ e peoc'h penn-da-benn, e sachas war ar rideozioù hag e reas ul lamm war he gwele, ma stalias ar pezh mell levr war he barlenn, sklêrijennet gant kleuzeurig he zaol-noz. Pa zigoras an Agripa e souezhas o lenn Sally Poultrouilh en diabarzh.

Liammet e oa gant al levr abaoe lid Pok ar Sor-
serez.

« Gra war ma zro gant da galon.

Gwarez ac'hanon evel da vrasañ mignon,

Gra din moumounoù, flouradennoù,

ha krabichadennoù,

Ma profin dit ma holl vurzbedoù.

Met diwall da faziañ,

Rak ur strobinell c'hwitet

Ne c'heller ket dizober

Ne vez ket diverket,

Ha gwashoc'h e vez er vuhez,

eget ar spontusañ gwallhunvre.

Bez karantezus,

Ma tispakin kevrinoù prizius »

Treñ a reas ar bajenn zegemer, da zizoleiñ an

Agripa a dalme dindan bouedig beg he bizied. Flourañ a rae, goustadik, pajennoù ken flamm hag ur galon vev. Liammet e oant gant ur vlevenn hir. War pep bajenn e oa lizhiri teñval, evel pa vefent bet kaerskrivet gant an diaoul.

Eztaolet e oa an troioù-hud, pazenn ha pazenn, gant menegoù da geñver ar riskloù.

Strobinell « *Ar gwirionezioù don* », da skouer, a roe ar galloud da vestroniañ an teodoù. Pep den a veze komzet gantañ a veze rediet da lâret e vennozhioù onestañ, daoust d'an droug a c'hellent ober.

Evit dont a-benn d'ar strobinell-se e oa dav fardañ un died oc'h implij poultrenn ur steredenn o paouez kouezhañ war an douar, ar pezh na c'hoarveze ket bemdez.

Ar bajenn da-heul a oa gouestlet da rekiye « *Divaskell al logodenn-zall* », a ginnige an died dibar evit lakaat da greskiñ divaskell divent betek tarzh bannoù kentañ an heol.

Peget e oa bet ul luc'hskeudenn gwenn ha du o tiskouez moereb Astrida pa oa yaouank, fier gant he divaskell vlevok, o vont da lammat diwar toenn ar savadur.

Ar meneg « *Graet* » a oa bet dornskrivet ganti war ar bajenn-se, kement ha war bajenn « *Penaos*

deskiñ ur yezh en ur gousket », hag e giz-se gant an darn vrasañ.

Pegen barrek e oa-hi, a soñjas Sally. Tristik eo bezañ ur sorserez c'halloudus ha koll he buhez gant ur gwallzarvoud droch, memestra. Erfin, n'eus doare speredek ebet da vervel. Teurel a reas ur sell ouzh ar poltred familh, hag ar glac'har a lakaas e grabanoù warni betek erruout d'ar bajenn eizh hag hanter-kant. Lenn a reas a vouezh uhel, evit reiñ muioc'h a wirionez d'he dizoloadenn « Dihuniñ ar re varv ». Penaos reiñ al levenez d'he zad ? Kas kuit Bomparquet mesk-ha-mesk gant an digenvez ? Etre he daouarn e oa an diskoulm. He mamm a c'hellfe bevañ en-dro a-drugarez d'ar strobinnell pevar ger a oa dindan he daoulagad.« Dihuniñ ar re varv ! ». Hag an eñvorennoù renket e boestig fromoù he bugaleaj en em stummas dirazi, ken plijus ha dous, evel c'hoarzh he mamm pe tommder he c'hroc'hen, ha ken buan e steuzias brumenn he c'hoantoù, m'en em gavas en-dro hec'h-unan-penn en he c'hambri sioul. Hunvreoù, tra ken.

Ne oa nemet un nebeud elfennoù da strollañ koulskoude ! E-diabarzh ur c'helc'h treset gant un tamm kleiz e oa dav staliañ ar goulaouennoù-koar ha dibunañ ar bedenn. Disterat ar striv.

Met un evezhiadenn a droc'has anal Sally evel pa vije bet flastret he bruched gant troad ur ramz.

– Ha ma c'hellfen lakaat anezhi da zistreiñ ? Kuit da vezañ sorserez, kenkoulz tennañ gounid eus ma galloudoù. Met ma vefe dav din eskemm ma buhez gant he hini ? Ma zad a vefe eürus en-dro, d'an nebeutañ.

Un evezhiadenn ken kozh ma oa bet sunet al liv gant ar paper, a resisae e oa arvarus-tre an dro-hud-mañ : « ARABAT E LAKAAT ER PLEUSTR, rak n' eo ket marc'had-mat ar veaj distro eus bro an Anaon, ha ma ra pep hini diouzh e vod e c'houlenno an Ankoù e lod ».

En amzivin e oa. Plantañ a rae he dent-krec'h en he muzell draoñ. Fidelio a oa en he c'hichen, o sellet outi e-giz un den komprenus.

Diouzh stumm ar reizhskritur e oa bet skrivet an evezhiadenn da vare ar Grennamzer. Abaoe ne oa ket bet graet gant den. Ma oa bet re zañjerus evit Moereb Astrida zoken, n'he doa ket Sally da dortal.

– Ma, klaskomp un dra aesoc'h. Tamm-ha-tamm e vez graet e vragoù da Yann.

Beg he blev mel a-ruz war al levr, lonket he dremm, krommet he c'hein, e lezas hec'h Agripa da henchañ anezhi e milendall an huderezh. Mousc'hoarzhin a reas erfin, o kavout an died, aes d'ober, a cheñchfe he buhez. Kavet he doa rekipe

ar gwin a garantez.

Ludu drein pesked, pluñv brini, traezh
greunvaen.



An dug hag ar sorserez

M'o doa an dud gour lakaet ur vevenn etre an div blac'h, ne oant ket bet pell o kavout an doare da dreuziñ anezhi. Sally he doa graet un toull er plañchod a-benn gelllet eskemm trankilik gant he c'hamaradez ha kelaouiñ anezhi he doa lakaet an dorn war an Agripa. Komz a rae an gant eben, ul lagad peg ouzh an toull ken ledan hag ur werren-greskiñ.

– Prientet em eus ur prof evit an aotrou Bomparquet. Dre bennozh Kupidon e vo tizhet e galonig ha liammet gant hini an amezegez !

– Piv ? Magda ? Paourkaezh maouez. Penaos 'peus graet da jeu ?

– C'ha c'ha! Silet em eus pep a bedadenn er

boestoù-lizhiri, o kinnig rannañ ur pik-nik, ha silet ar gwin a garantez en termos kafe. Bomparquet a vo soubet e trubuilhoù ar garantez ha n'en do ket amzer ken da sammañ ac'hanon gant e boelladennoù enoeüs.

– Ne greden ket ma c'hoar pa lâre din e oant el liorzha war ur pallenn o pokat hag o c'hoari evel bugaligoù. Lezet en deus anezhi da fichañ e vlev e stumm un alarc'h, d'ober ur par d'he barez, ha war-lerc'h e oant o vrañsigellat asambles...

– Ec'h ! Ma stomok a nac'h klevout an dibenn, a droc'has Sally.

– Pegen kizidik out ! Me 'm eus un dra evidout. Spi 'm eus ne raio ket aon dit.

Ur parch a strinkas eus an toull du. Pajenn diroget un deizlevr e oa, skrivet d'ar c'houlz ma veze implijet kroc'hen leue nevez-c'hanet da baper.

– Tadaaaaam ! Furchet em eus e burev ma zud. Me 'oa o klask war-lerc'h doser afer Viktor Valerius. Kavet o deus un testeni, ha biskoazh kement all, skrivet eo bet gant un den dianav rak, war a seblant, n'o deus ket kavet an deizlevr klok. Islinenet em eus al lodenn liammet ganit. Marteze e c'helli kavout un arverk all.

« Miz Du 1764, devezh an torfed, fiziet e skeud ar c'hantolor.

Sed aze kevrin gwashañ ar Gerlutiged, bev-mat c'hoazh em fenn.

Ur razh treut war pavez ar blasenn a rede etre pour brein ha pennoù pesked flaerius. En em silañ a rae etre lastez ar marc'had ha treid liesseurt, lod gant botoù koad, lod all gant botoù lêr. Chom a reas a-sav da grignat un tamm bara kras, betek gouzañv taol e voued a oa e gwirionez un troad lous divotez, ha da nijal e kasas anezhañ.

Ar Sadorn-se a oa un devezh gouel evit annezidi ar gêr a oa en em vodet tro-dro d'al leurenn gaer savet diwar koad lufr. An derc'hent e oa bet kaset a-ratozh-kaer eus ar gêr-benn al leurenn hag he bravig : an dibennerez. Ambrouget e oa bet an hollad gant gwarded ha dre red ar stêrioù e oa erruet.

Evit ar wech kentañ e vefe lazhadenn un noblañs e Kerlutig ha setu ma veze lakaet a-gostez an dleoù, ar rebechoù ha pep darempred stegnet evit profitañ eus ar prantad-se en un aergelc'h plijus ha disoursi.

E penn all ar blasenn e oa bet savet ul lochig diwar pevar peul ha rideozioù, ma oa bac'het ar

c'hondaonad. Staliet e oa bet pellik a-walc'h a-benn lakaat e zibunadenn da badout ha reiñ ton an drajedienñ d'al lid. Enebour an devezh a oa ponner e gammedoù, met sonn e chome-eñ, o vont goustadik etrezek an Anaon, dalc'het a bep tu gant gwarded postek. « Pegen koant eo ! Ha pegen yaouank e vo e intañvez » a chuchumuchue an arvesterezed. Arvestourien all, diabafet, a huchas goapadennoù.

Skleur an heol war lavnenn an dibennerez a oa nec'hus d'an arvesterien, a lakae o dorn ouzh o zal da welet splann ar prezegenner. Hennezh, a oa liv ar vran warnañ, eus e seulioù betek e c'hroñj uhel. Ur parch a zirollas, hir, hir, ken ma pokas d'al leur. Ur basadenn, ha lenn a reas a vouezh uhel.

– Keodedourion gaer, dindan berr e voc'h test eus lazhadenn ar c'hondaonad, an dug Viktor Valerius, kablus da dreitouraj en arbenn d'hor Meurdez, ha dre-se, en arbenn da Zoue ha d'ar vro a-bezh.

Daoulagad yac'h o deus gwelet euzhviled ar vro o tont da zañsal e bal e vaner.

– Euzhviled ? N'int nemet bugale an noz, a respontas ar c'hondaonad. Gwan eo ma c'horf met ma spered ne c'hell ket bezañ trec'het. Dic'houzougit ac'hanon ma fell deoc'h. ***Genel a rin en-dro, koulskoude, ha d'ar mare-se e c'halvin ma re.***

– Un dra bennak da ouzhpennañ evit silvidigezh hoc’h ene ?

Viktor Valerius a lemas ar seizenn a stage e vlev hir. Ur minc’hoarzh spontus war e zremm.

– Troc’hit ‘ta ma blev ma vin dibennet kaer, rak klevout a ran karrigell an Ankoù o tont evidon, hag en touiñ a ran, loened daonet, e welo ho pugale e falc’h merglet a-raok pell.

Ur gward a sentas gant plijadur, o troc’hañ gant abafted an neb a gren gant aon ar c’hastiz.

E-unan ez eas Viktor Valerius en e astenn war e gof, e sell war-zu ar sac’h patatez a resevas e benn diouzhtu pa voe distaget ar gerioù « Ra vo dibennet. »

Trouz boud al lavnenn bonner o stekiñ war ar c’hoad, harzhadegoù ar chas, strakadegoù daouarn ha c’hwitelladegoù : buhezek e voe Kerlutig gant sonenn al lazhadenn tra ma sonas ar c’hleier gant lusk an euredoù laouen.

An teodoù a oa tomm da eskemm. Peadra o defe da gontañ da amezeien an trowardroioù pa vefe foarioù bras. O bugale ivez, kement hag o bugale-vihan a glevfe istor an devezh-hont ma strimpas gwad an dug daonet war plasenn ar marc’had. Bodet e oant neuze dre strolladigoù evel evned o pigosat a-gevret restachoù bara-dous.

A-daol-trumm e tavjont holl gant ur skri-
jadenn. Biskoazh ne voe klevet tristedigezh ken
mougus er vro. Ar razhed a zilezas o zeñzorioù da
achap etre an treid, etrezek neblec'h, gant ma vefe
ar pellañ posupl eus ar vaouez yaouank. « Sorse-
rez an dug ! » a gleved e-mesk an arvesterien.

Goeñvet e oa he dremm gant ar fulor, dourek he
daoulagad ruz. He blev a nije en aer ponner karget
a dredan a darzhfe buan en oabl louetoc'h-louetañ.
Dindan he c'hazel e oa ganti ur pezh mell pikol
levr a zispakas dirak he zreid. En he sac'h lien e
pakas ur skourrig balan a savas uhel a-us he fenn,
tra ma pegas an tan ennañ gant al luc'hed, hag,
dizolo he bruched, e tistagas ul lavarenn, heñvel
ouzh ur strobinell :

Gant ar gounnar e vo stlabez

Ha gant glac'har ar follentez !

Tan d'am c'halon ha d'ar balan

Ton d'an dañs ha d'an emgann

– Yezh an ifern, merc'h Lilith ! Biskoazh ke-
mend-all... Achapit holl ! Tec'hit ! a yudas ar
barnour o sevel e sae da gregiñ gant ur redadenn.
Ar sorserez a stlapas ar skourr war e du ha tan a

begas en e sae. He diwiskañ a reas met kerkent hag analet ar moged en em roas d'un dañs fifilus o trouzal evel ur pemoc'h. Ar moged en em ledas ker buan all ha goloet e oa ar blasenn gant ur vrumenn hud, troet da vouk, tra ma kollas pep hini e skiant vat a-raok bezañ graet daou gammed. Dorn eben a dapas dorn egile, hag ur c'helc'h a voe savet hep na c'hellje hini ebet mestroniañ e gorf.

Dañs diroll ar feulster a grogas neuze. Gwarded ha pobl kemmesket oc'h en em skilfañ, dentañ ha gwashoc'h c'hoazh. Gant stlakadeg biz bras ha biz meud ar sorserez e steuzias ar vrumenn, tra ma chomas a-sav pep hini gant dañs ar marv, sabatuet o welet anezhi o terc'hel penn Viktor Valerius dre e vlev rodellek du. Ur minc'hoarzh spontus a oa treset war e zremm ken ma seblante bev c'hoazh. Spontusat abadenn !

– Sellit mat outañ, Kerlutiged ! Ma c'helloc'h anavezout anezhañ pa zistroio da gerc'hat ac'hanoc'h !

Fourrañ a reas ar penn er sac'h jut ha diwar wel ez eas, asambles gant ar gorventenn.

Promesa an dazont drastus a liammas an anezidi, gant muioc'h a nerzh c'hoazh eget kevrin mezhus ar strobinnell na venegfent morse. Klask a rejont war-lerc'h ar sorserez tec'het gant penn an diaoul, hag evit talañ ouzh an anken e kanjont :

Kordennig,

Skoulmig mat,

Kordennig,

Skoulmig start

Pa errujont e maner Viktor Valerius e c'hwezhjont ur pezh mell tantad. Ar flammennoù a sklêrijennas an nozioù don betek ma kouezhas ar voger ziwezhañ.

Ar wezenn dostañ, evelkent, a voe miret, da vezañ da viken arouez an droug, tra ma roas e anv da straed ar skav-gwrac'h.

En desped ma voe lieskementet an oferennoù ha ma reas ar barnour e seizh hag hanter-kant gwellañ evit frealziñ an annezidi, e vevas ar Gerlutiged dindan beli an arvar. Hag hiriv c'hoazh eo stag aon an distro da gement boud bev a annez ar gêr. »

Prederiet e voe ar plac'h yaouank gant he lennadenn. Petra 'oa ar gwellañ ? Bezañ suj da Viktor Valerius, ma tistrofe, pe bezañ chaseet gant ar re Van Oplossing ? En etredaou e oa-hi.

O vevañ ma oa er savadur savet diwar rivinoù

ar maner, ne chomfe ket diseblant d'ar villigadenn o tont da wir. Dilojañ en un igloo e penn pellañ Antarktika a vije bet mat dezhi ivez, a-benn ar fin.

– Judi, emañ da gerent o labourat bremañ neketa ?

– Yep.

– Fellout a ra din farsal un tammig. Laouen e vefes d'ober taolioù-arnod gant an Agripa ?

– Laouen. Ma kavez an doare da skarzhañ Bomparquet eus da ranndi.

– Kudenn ebet, sur on en deus sec'hed.



Preizh ha preizher

Pintet e oa an Agripa war ar pulpitr, an divaskell baper ruz digor-frank dindan selloù an div blac'h.


– Pa c'hellfes barbotal gant tasmant n'eus forzh peseurt gwaz pe gwreg, pehini a zibabfes ? Un den en deus bevet daou vil bloaz 'zo ? Pe un den kar ? Van Helsing ?

– Mmmh... Dav e vefe din prederiañ. Unan a gomz ar memes yezh ha me, sur, eme Judi. Met skrivet eo ne c'hellomp ket dibab. Ar strobinnell a dap an ene tostañ ! Soñj 'ta, ma vefe hini ur c'hloareg !

Staliet e oant e kambr Sally, darev d'ober Galv an tasmant. Stegnet e oant evit o lid kentañ. Heuliet o doa kuzulioù al levr, skrivet warnañ e

oa dav prientiñ peadra da zegemer an tasmant :
gwispid, dour, ur goubenner, e ken kaz, hag ur
c'horn-butun chouket gant turkantin ar gegin. Ur
gwir sorserez e oa-hi dirak he levr dispaket.

– Pazenn gentañ : tresañ un tric'horn enskrivet
e-barzh ur c'helc'h.



– Peseurt tric'horn ? Izoskelel pe keittuek ?

– Ne vern. Gra unan gant tri zu, tri c'horn ha mat pell 'zo. Eil pazenn : lakaat ul loaiad-kafe traezh e-kreiz ar c'helc'h.

Judi a dresas al lun gant un tamm kleiz. Hag hi da lakaat ur c'houlouenn-goar e pep korn. A-feur ma tibunas Sally ar bedenn hud e savas an traezh diwar al leur, greun ha greun, da wiskañ a-nebeudoù korf treuzwelus ur vaouez. Lugerniñ a rae ar perlez kwartz ledet war he stummoù ront. Kelc'hioù a reas an dasmantez gant he divskoaz evel pa vije chomet stanket re bell etre plankennoù reut he arched. Krenañ a reas he bruched bronnek. Ur skarzhadenn draezh a strinkas eus foñs he gourlañchenn, da gouezhañ e-harz treid Sally.

– Piv an diaoul en deus ma c'haset amañ en-dro ? Kuitaat ar Gwenva peder steredenn evit an tamm douar patatez-mañ ! Spi 'm eus ho peus ur sapre digarez da zirenkañ ur boud bev war e leve.

Barradoù avel domm a save er gambr, ken ma savas blev ar merc'hed er vann. Ne habaskaas nemet pa glaskas Fidelio flourañ he morzhed gant e benn.

– Degemer mat, Moereb Astrida.

O klevout hec'h anv-bihan e tistennas kerkent

an dasmantez. Ur spisverk e oa hag a sache war hec'h eñvorennoù denel, o kas da soñj dezhi he doa bet un identelezh war an tamm douar-mañ.

– Hañ, ya, kompren a ran gwelloc'h. Sally out-te. C'hoari a rez gant an Agripa am eus lezet dit... Laouen on da vezañ dibabet ac'hanout. Da dad a vije marvet kalz fonnaploc'h.

Tanañ a reas ar c'horn-butun gant ur c'houlaouenn e kelc'h al lid, teuzet a galz, evel an div all. Ne badfe ket pell ar gaozeadenn. Judi a oa mut-mik gant an abadenn, boemet, daoust m'he dije kavet gwelloc'h ober anaoudegezh gant un den a uhelvrud.

– Lazhet on bet. N'on ket kouezhet drezon ma-unan, a gendalc'has ar wrac'h, o kas an dorn d'he zal distummet. Edon o selaou un ton opera. Troc'het em boa tammoù konkombrez da zebriñ ha rodelloù silzig da lakaat war ma daoulagad. Pe ar c'hontrol. O vorediñ e oan war ar ponda-
lez-diavaez, ha bountet on bet.

– Piv en deus bountet ac'hanoc'h ? a eilgerias Judi gant primder an enklaskerez.

– Pa 'm bije bet daoulagad em c'hein e respontjen dit. Me 'soñj din e felle d'ar muntreer skrapañ ma levr dreistordinal, ma mad priziusañ goude Fidelio hag an dastumad aeled porselen... a ranker

naetaat gant chug sitroñs, dre ret !

Ar vaouez-traezh a steuzias pa varvas ar flam-mennig diwezhañ.

– Moarvat e klasko unan e dapout diganit.

– Gwir a lârez. Dav eo deomp gouzout petra a zo c’hoarvezet gant Moereb Astrida. N’eo ket spered an hetoù a zo kablus, met un den gwir, bev, diwar gig. Chaous.



Ur muntre, euzhvil pe get, a oa er c’har-ter. Deuet e oa a-benn da zrouklazhañ Moereb Astrida, ur sorserez ampart. Aes-tre e vefe evitañ en em zizober eus Sally !

– Un amezeg a c’hello sikour ganeomp da zi-rouestlañ an afer-mañ, a lâras ar sorserez.

Mennet a oa ar mignonezed da atersiñ an aotrou Spontailh. Hennezh a oa bet servijer er maner, boas da zaremprediñ gant ar sorserien hag ar sorserezed. Ouzhpenn da se e oa plantet el liorz evel evezhier abaoe kantvedoù. Moarvat e oa boud desketañ ar c’harter war tachenn an hude-rezh. Marteze ivez e oa bet test eus kouezhadenn ar wrac’h ?

Adarre e tremenjont ar vevenn ha rideoz ar plant gouez en em serras warno. Du pod e oa.

Ar wech kentañ koulskoude e oant bet sklêri-jennet gant goulaouenn-goar ar penn-sitrouilh, evel un tour-tan e mor glas an delioù hag an drein. Paouezet e oa da ganañ e luskellerezh. *A-c'houde pell ?* a c'houlennas Sally outi hec'h-unan, rak n'he doa ket bet da glemm da geñver he c'houk an nozioù tremenet. Ur puñs gouloù a zesachas anezho etrezek al lodennig dizolo na oa ket e gwasked ar skourroù. Ar gabanenn vaen a seblante sklaer dindan skeud al loargann.

En he c'hichen e oa an aotrou Spontailh. Nemet e oa difiñv. Gwallgaset e oa bet. Diroget e oa e zilh.

– Marv eo ! a estlammas Sally.

– Penaos e c'hellfe mervel pa ne oa ket bev ? N'eus ken 'met enaouiñ anezhañ en-dro ha mat pell 'zo.

Sally a gemeras e benn sitrouilh etre he divrec'h. Dre chañs e vezont kalz skañvoc'h pa vezont goulo.

– Chuchumuchu ! Judi a lakaas he dorn war he genoù. Honnezh a oa war-nes babouzat warni evit farsal met ken sirius e oa-hi ma selaouas anezhi kentoc'h. Desavet e oa bet da vezañ kizidik

da gement trouz a oa tro-dro dezhi. Stegnet e oa izili Sally. Ur bir a dremenas etre o daou fri. Darbet e voe da bep hini koll o c'hempouez. En ul luch lagad e taoulinjont, ha moustrañ war o anal. Chaset e oant evel euzhviled.

– Dre amañ, eme Sally. Tri metr hepken a zisparti ac'hanomp eus ar gabanenn. E goudor e vimp enni.

– Gwashoc'h c'hoazh... c'hoant az peus da vezañ danvez pred ur suner-gwad ? Ar beziou eo o c'hambreier !

Sally a sellas pishoc'h ouzh ar gabanenn. Dre an nor damzigor e welas stumm un delwenn en he gourvez. Tennañ a rae muioc'h da vez un nobl eget d'ul lec'h evit renkañ an dafar liorzhañ, ha war ar gourin-dor maen goloet gant an iliaev e oa kizellet al lizhiri VALERIUS. Sally a grenas gant an dizoloadenn-se.

Mont a rejont goustadik en o fuch evel glesker. Ar pal a oa kuitaat al lodenn war zizolo hag en em veskañ gant ar fraost dall. Sally a starde penn an aotrou Spontailh ouzh he bruched. Ur wech kuitaet kelc'h diblant ar bez e tapjont o anal en-dro. War ziwall e voent muioc'h c'hoazh pa glevjont un huchadenn spontus. Mouezh ur mell loen e oa. Ur son boud, diwanet diwar boan ha fulor. Kammedoù ponner a dostae, o tistruj ar plant. Judi a oa

reutaet. Ar gwask a flastre he freder. Gouzout a rae Petra a oa o tostaat ha ne oa ket bet desket da dalañ outañ.

Sally a sachas warni d'he lakaat da sevel. Staliañ a reas ar sitrouilhenn uhel war gef ar wezenn dostañ. Pediañ a reas he mignonez da grapat gant ar skourrou. Arvarus e oa bezañ er wezenn rak ur wech gwelet e vefent tapet ha lonket. Met piv a oa en e soñj klask e breizh er gwez ?

Dindano e tremenas al loen, o huchal adarre. Postekoc'h eget ur gwaz. Blevokoc'h ivez. Ur bleiz oc'h en em zerc'hel war e zivesker, diskuilhet gant al loar. Darbet e voe dezhañ diguzhat anezho, met Sally a stlapas he botez kleiz. Egile all, daoust ma oa mac'hagnet, ne nac'has ket ar c'hoari. Redek a reas war-lerc'h ar votez ha drailhañ anezhi didruez, a-raok kenderc'hel gant e redadenn, daoust d'ar bir en e vorzhed, dre ma oa pourchaset gant an doktor hag an doktorez Van Oplossing. Poent e oa d'ar merc'hed distreiñ d'ar gêr. An dibab o doa etre c'hoari kuzh-kuzh gant ar chaseourien, en arvar da vezañ toulet gant biroù, pe kemenn dezho e oant en diavaez ken diwezhat, diaotre ma oant da vezañ asambles. Peadra da dapout ur bini-jenn beurbadel.

Met, penaos, e oa mouzhet Judi diouzh he zu, o vogediñ evel ur menez-tan, dipitet abalamour m'he doa Sally divizet aberzhiñ he botinez kleiz.

Petra rafe-hi gant ur voutez hepken ?



– Kontit deomp ‘ta petra a zo c’hoarvezet deoc’h, ha da Astrida. Anavezout a rit bugale an noz, moarvat e c’hellit lâret deomp ar pezh a ouit. Penn an aotrou Spontailh a oa bet lakaet war an azezenn goad war bord ar prenestr. Enaouet o doa e c’houlaouenn-goar, a lugerne dre e veg hag e zaoulagad tric’hornek.

– Ul liamm zo gant ar villigadenn ? a c’houlennas Judi.

– *M’eus ket soñj ken, goullo eo ma fenn,*

‘n eus ket an disterañ greun em frouezbenn ;

A-wechoù koulskoude e tarz’h un eñvoren.

Burzhud eo, n’eo ket milligadenn,

...

Fnoz e rankoc’h dibab etre yev hag ifern !

Diroll a reas da c’hoarzhin gant un darzhadenn dan. E flamden a vrasaas, hag en em ledas e diavaez e zremm dre toulloù e veg hag e zaoulagad tric’hornek.

– *O tistreiñ emañ, kroget eo an abadenn.*

– Piv zo o tistreiñ ? Viktor Valerius ? Ma Agripa zo ganin c'hoazh.

– *A-raok pell en em gavo etre daouarn all.*
KROGETEO AN ABADENN.

– E vevel out, neketa ? Deuet a-benn da zreistbevañ a-dreuz ar c'hantvedoù ?

– *Deuit 'ta, tostait 'ta, poent eo kregiñ...* a c'halve-eñ en ur ganañ, ruz-flamm.

Mougañ a reas Sally gant ar barrad tommder. Judi avat, ken kizidik ma oa d'al luskellerezh, ne enebas ket, war-nes kousket. Horjellañ a rae he fenn gant luskellerezh ar sabad. Sally a zigoras ar prenestr tra ma tañse ar flammenn, hejet gant ur skourrad-avel.

Tapout a reas ar penn sitrouilh etre he daouarn, tostaat he muzelloù ouzh e veg ha c'hwezhañ war ar skleur lentik, da lakaat Aotrou Spontailh da devel da vat.

Ne oa trouz ebet ken, nag er gambr, nag er savadur a-bezh, evel pa vije steuziet kement den a veve eno. Klevet o dije ur gevridenn o steuñviñ he gwiad. Sally a grabise he groñj.

– Marteze emañ ar wirionez gantañ hag emañ eur an distro. Ha ma vefe re ziwezhat...

– Re ziwezhat e vo pa vo bet laeret da Agripa diganez. Sally a zastumas anezhañ dindan he gwele.

– Ha bremañ ?

– Dav eo deomp dizoleiñ peseurt istrogell a fell dezhañ plantañ reuz e Kerlutig, a respontas Judi.

– O furchal e doseroù da gerent da skouer.

– Evel-just, Aogust.

Ken ponner e oa an didrouz hag an oabl sammet gant feson arnev ma tarlammjont kerkent ha son skiltr alarmoù burev an doktor hag an doktoez Van Oplossing.

A-dreñv ar c’hontilli, gwaregoù, rouedoù ha krochedoù boser e oa strollet an dielloù kuzh.

Dasparzhañ a rejont al labour en didrouz, ha lenn, azezet war gadorioù klet a servije ordin d’ar pratikoù. Aferioù liesseurt a oa : « Morganez ar c’han-skarzh », « Kanerezed-noz ar poull-neuial »...

– Dal, eme Judi. Un doser o deus diwar-benn « Milligadenn Kerlutig »! Abaoe ar penn-kentañ e labouront war an afer-mañ. Bez’ ez eus titouroù diwar-benn kement den a annez hor savadur. Lenn a reas a vouezh uhel.

– « An aotrou Poultrouilh : Ijinour...Sally Poultrouilh : chom war evezh ganti rak kustum da vale da noz..., Magdalena Spilhenn-Aour : Kemenez vrudet, intañvez pemp gwech... Gary Lipous : Rener an asurañsoù Lipous, den bleiz »

– Gary Lipous eo an den-bleiz ! a estlammas Sally. Bez' e c'heller bevañ tost ouzh tud hep gouzout netra diwar o fenn.

– Ha c'hoazh, ne 'z peus ket klevet an dibenn, a respontas eben.

« An aotrou Bomparquet... Meneg : da ziwall. Hervez e lavarou en deus tremenet e vuhez a-bezh e Kerlutig, met n'eus tamm roud ebet evit testeniañ eus e istor nag eus e identelezh. Martezeadenn : diskennad Viktor Valerius eo-eñ. »

– Evel-just, an aotrou Bomparquet, eme Sally. Gwashañ den ne gaver ket er vro. Sur-mat eo bet raktreset e zistro gantañ. Deuet eo da labourat du-mañ evit bezañ tostoc'h eus ma levr strobinoù. Faziet e oan o soñjal e vije bet jentiloc'h a-drugarez d'ar garantez. Pa soñj din em eus lakaet ar paourkaezh Magdalena en arvar ! Dav eo din mont da welet anezhi diouzhtu.

Amprestañ a reas ur gontell verr, e ken kaz.

– Bez' e rankez kelaouiñ anezhi. Eno e vin a-benn div vunutenn. Ez an da zihuniñ ma c'hoarezed.

Krapat a reas gant an diri a-bevaroù, betek kerzhout war ur c'horfig blot. Fidelio a oa gourvezet war al leur. Toullet e oa e c'hof. Furchal a reas en he levr a-benn kavout un doare da bareañ he loen.

– Ma. Dav eo din kavout saoj ha bouzelloù razh...

Fidelio a savas an daoulagad d'an nec'h ; perak he doa dibabet Moereb Astrida ur plac'h ken amparfal d'ober war-dro un Agripa ken pouezus ?

– Kerzh kentoc'h da skoazellañ an dimezell Magdalena, a lâras ar c'hazh. Ar vaouez-se a oar dibab ar fourmaj lapin.

– Fidelio ! Gouest out da gomz !

– N'eo ket un digarez evit gortoz diganin klakenniñ. Nag evit pokat din aliesoc'h.

– Piv...

– Gary daonet, a droc'has Fidelio, ar sac'h laou-se en deus dentet ac'hanon.

– Moarvat ez eo mestroniet gant Bomparquet pa vez dindan e stumm den-bleiz, a chalas Sally.



A-dammoù

Sally a stokas kerkent ouzh dor Magdalena. Yac'h-pesk ha dibistig e oa.

Dre chañs ne oa ket an aotrou Bomparquet ganti pa zegemeras anezhi en he saloñs. Azezañ a rejont war ar gourvezvank blot. Morse n'he doa bet Sally ar garg da zegas keloù fall d'un den kar. N'he doa ket prientet he frezegenn. Lâret a reas, krak-ha-berr, e oa danvez arvarus en aotrou Bomparquet.

– Ma c'haredig, e darempred gant an diaoul !
Louston vil, chug brein loeroù lous, m***** !
Kouezhañ a reas he ferukenn alarc'h, o tiskouez
pegen rouez e oa he blev. Koshoc'h e oa eget na
soñje da Sally.

– Foei d’an eured, a ouzhpennas o lemel he gwalenn. Digeriñ a reas he genoù d’he lonkañ. Dav e vo distruj ha pulluc’hañ anezhañ. ‘Ne ‘m boa merzet netra iskis gantañ. Netra, netra, netra.

Marteze ez eo peogwir em boa roet un dourenn bud deoc’h, a soñje Sally mezh ganti.

– Ha koulskoude e anavezan sioù kement den a vev er savadur, a ouzhpennas ar gemennerez, didon he mouezh. Da skouer em eus dizoloet ar wirionez diwar-benn Gary Lipous abaoe ur prantadig. Loened hanter-debret, e ranndi distrujet da bep loargann, paper-moger an trepasoù diroget, c’hwezh ar staot war ar boestoù-lizhiri, poubellennoù drastet... Pa vever en ur ranndi, e ouier buan sekredoù an holl.

– Ha kevrin Astrida ?

– Astrida a oa ur sorserez, evel-just. Anavezout a raen anezhi mat-tre. Prometet he doa ur prof din, ul levr dibar.

– Hec’h Agripa.

– Ya. Ha peadra zo e-barzh da zrastañ Bomparquet. Bez’ e c’hellfe lakaat e grabanoù warnañ. Kreñvoc’h e vimp egetañ ! Laouen e vefen da gaout al levr strobinnell. Reiñ a rafes anezhañ din, Moutig ? Bez’ e rankez mont da gerc’hat anezhañ bremañ-diouzhtu-kerkent hag hep gortoz, kuit

da vezañ sammet gant mil mallozh ! Aes eo d'e anavezout. Ne c'heller ket faziañ. Koshoc'h eget ar mojennoù, maget a-dreuz ar c'hantvedoù gant ar re o deus bet anezhañ etre o daouarn. Ul levr eus ar re a zo bet, diouzh a lavarer, skrivet warne gant an diaoul. E bajennoù zo ruz evel ar gwad fresk hag e c'holo zo du evel al ludu graet diwar un aberzh sakr...

A-feur ma komze e tostae ouzh Sally, kement ma c'helle santout hec'h anal ouzh he c'hoùg.

– Un Agripa zo prizius, Sally, eus ar madoù priziusañ a c'heller kaout. Anat e klasko unan bennak e laerezh diganit. Setu perak e rankez chom hep lâret da zen ez peus unan.


Gerioù Moereb Astrida a zassone enni. Dav e oa gwareziñ al levr hud. En arvar e oa. C'hoant he doa da zistreiñ d'he ranndi. An Agripa a oa en he sac'h-kein ha bez' e ranke chom e-barzh. Diouzh stumm hirgarzennek dindan al lien, e oa splann e vezañs koulskoude, evel un armel lonket gant un naer.

N'he doa ket c'hoant da ziskouez anezhañ da Vagdalena, un tamm re gurius hervezi.

– Ne 'm eus ket gwelet anezhañ. Sur, sur, sur, he doa respontet gant muioc'h a asurded eget n'he doa e gwirionez, o kreñvaat ton he mouezh a-ra-

tozh da lakaat da grediñ e oa en hec'h aez.

Met livañ a rae gevier evel ma liver pa vezer er skol-vamm, da lâret eo gant disoc'hoù dister. Dre chañs avat, e tegemeraz eben all he respont gant ur mousc'hoarzh madelezhuz.



– Ez an da gerc’hat ma lunedoù heol, ha da c’houde e tiskennimp d’ar pempvet estaj da glask anezhañ.

Pa lakaas he zreid e diavaez ar saloñs e savas prim Sally. Ne oa ket evit gouzout ha tomm pe yen e oa dezhi, met ar c’hwezh a zeredas eus he zal hag a-hed he c’horf, pa nac’has an dornell plegañ d’he c’hoant. Al logodenn a oa stanket e lez ar c’hazh. Perak n’he doa ket merzet e oa bet prennet an nor gant Magdalena ? Chaous !

Gellet he dije redek buanoc’h eget ar sorserez gozh...

Un analadenn hir : unan, daou, tri. petra ober ? Semplañ pe talañ ? An eil dibab a oa gwelloc’h dezhi, ha daoust ma oa blotoc’h he divc’har eget spaghetti poazh e klaskas ar sal-dour. Eno e c’hellfe bezañ e surentez, amzer dezhi en em silañ dre ar prenestr, diskenn gant skourr ar skavenn-wrac’h.

Met en em gavout a reas e teñvalijenn un trepas strizh, sklêrijennet hepken gant goulaouennoù-koar babouzus strollet dindan ur pezh mell poltred a ziskoueze war ur foñs du, e doare eoul-livadennoù an triwec’hvet kantved, ur c’houblad yaouank karantezus. Ar gwaz gant e vlev rodellek du, a denne d’he zad, hag ar vaouez... Kilañ a reas Sally gant an heug oc’h anavezout tresoù Magdalena war ur vaouez a rankje bezañ marvet pell

zo. E penn an trepas ne gavas ket ar sal-dour met ur pezh brasoc'h.

Diouzh an estajerennoù leun a bodoù gwer ma oa pezhioù kor soubet e dourennoù glas e soñjas da Sally en em gave e labourva ur follez. A-dost ez anavezas organoù a bep seurt. Frond ar gwinegr e oa hini ar chug-mir. Er pod brasañ e oa ur penn. E vlev gleb a oa heñvel ouzh ar bezhin a zamguzhe an dremm, met ne viras ket outi da zivinout e oa gwaz ar vojenn, Viktor Valerius. Ur mousc'hoarzh a oa ouzh e vuzelloù.

Kaset e oa bet Sally aze daoust dezhi. Edo ar sorserez ouzh he gortoz.



– Un drugar. E familh ar re Boultrouilh e c'houlennan... ar verc'h ! An disterañ traig a-dreuz, Moutig, hag e lezan ma c'hi da grignat da gig yar.

Flemmus e oa he sell. Maskl ar goantiri a oa torret a-dammoù. E plas he ferukenn alarc'h e oa blev ken rouez ma c'helled kontañ anezho.

Strollet e oa Arzhur, Judikaela, he c'hwec'h c'hoar hag ar gerent Van Oplossing evel bugale binijet, azezet war ur bank hir. Goloet e oant gant

lipig barbecue. Difiñv e oant holl, war-bouez Gary Lipous, dindan stumm un den-bleiz c'hoazh, gant ur mell gouriz skoulmet tro-dro d'e goùg. Magdalena a oa mestrez war e fiñvoù, a-drugarez d'ur gordenn a sache didruez. Klemmuskat a rae abalamour d'e c'houli a ziwade.

Biskoazh ne voe gwelet ur c'hi ken vil. E c'harvanoù a chaoke an aer dirak an amezeien aonek.



N'en doa kinniget asurañs ebet e-keñver tao-lioù-dent a-berzh amezeien diroll. Moarvat en dije bet pratikoù.

Unan a oa kalz re ziwezhat evitañ, avat, da sinañ ur gevrat asurañs.

E-kreiz al labourva e oa ur c'horf divuhez, goloet gant ul liñsel wenn, gourvezet war un daol diskejañ.

– Piv zo dindan al liñsel ? a c'houlennas Sally. An aotrou Bomparquet ?

– Tamm pe damm. Hennezh zo ul lodenn eus ar miltamm. Ne vanke nemet daouarn d'am gwaz ha pourvezet en deus ac'hanon. A-drugarez dit rak ne vije ket bet ken aes hep e santimantoù krennard. Lakaet em eus peurrest e gorf e bez al liorz, gant al liorzhour, paotr al lizhiri hag al lastez all.

Sachañ a reas war al liñsel da ziskouez hec'h oberenn. Korf ur gwaz e oa, graet diwar wazed all. Propik e oa gwiad ar gemenerez. Liammet he doa ar c'hroc'hen gant danvez diouzh ar c'hiz.

– Ec'h. Patchwork-tud, krouet evit pintañ penn ho karedig miret e-pad ken pell.

– Dres. Un draig c'hoazh hag e krogimp gant al lid.

Tapout a reas ur bured diwar an estajerenn hag

e goulonderiñ a reas en he c'horzailhenn.

– An dakennig diwezhañ, emezi, tra ma kreske blev aour dezhi. He c'hroc'hen roufennek a blae-naas. He c'hein tort a savas yac'h en-dro. « Da betra asantiñ da red an amzer ? Genel, Mervel. Etre an daou, kontañ plegoù ar c'hroc'hen, breinañ e ti ar re gozh. Raktresoù e-leizh am eus. Sevel a rin ar maner en-dro, ur wech diskaret ar savadur gant e annezidi. Da heul e rin KerValerius eus Kerlutig. Da gentañ penn, avat, e vo lidet an distro : tuchantik e pedimp bugale an noz hag en em roimp d'ar sabad.»

Treiñ a rae kein ouzh Sally. Honnezh ne wele nemet monedoneoù ar spilhenn e penn an neudenn sach-disach. O klokaat ar c'horf e oa.

– Ha bremañ, strew da sac'h.

Sally, reut evel pa vije bet ur soudard plom, a sentas. Dilezel a reas an Agripa war al leur yen dirak treid ar vaouez kozh, tra ma huanade an Itron Van Oplossing diwar an dipit. Ar sorserez yaouank a lennas an aon war an dud gour. Kontañ a raent warni evit en em dennañ. Ne oa ket kustum da vezañ an neb a c'hellfe diskoulmañ ar c'hudennoù. Er c'hontrol, o paouez e oa reiñ ar galloud d'an enebourez.

– Gouzout a ran peseurt strobinell a zedenn

ac'hanoc'h, Gwrac'h. Dihuniñ ar re varv, neketa ? Met evel ma ouit e sent an Agripa d'an hini nemetañ a zo perc'henn warnañ.

– Evel-just, ha cheñch a raio dindan pell. Agripa ma familh a voe distrujet en tan-gwall. Hini Astrida zo tonket din. Nac'het he doa ober ar strobinnell. Bountet em boa anezhi. Ma ne c'hellan ket kaout anezhañ dre hêrezh, e c'hellan kaout anezhañ dre laerezh, a lâras Magda o tiskregiñ gant ar gordenn tra ma tostae Gary Lipous ouzh Sally, babouz leun e c'henoù.

Gra van, gra van, bez dinec'h hag asur. an taolmañ eo dav dit livañ gevier a galite. Bec'h de'i !

– Ur gudennig zo kouslkoude, a respontas Sally. Ma lazhez ac'hanon e tarzho e-unan da vont da goñfeti. Gwarezet em eus anezhañ.

– Ma... Dit-te da zihuniñ anezhañ neuze.

Sally n'he doa tamm skiant-prenet ebet war strobinnelloù ken kreñv. Pehini a vefe priz an igromañserezh evit un deskardez ? D'ar gwellañ e yafe da vezañ dall, mut pe moal.

Treiñ a reas ar pajennoù, betek an eizhvet hag hanter-kant hini. Tro-dro d'an daol diskejañ e stalias Magdalena ar goulaouennoù-koar fardet diwar druzoni gourglazard. Ar sorserez yaouank, e keit-se, a enaouas an tan dindan ar gaoter, da

lakaat ar soubenn daeloù da virviñ.

– *Reiñ ar pezh a zo goulennet, evit gervel an neb karet,* emezi. Eben a ouzhpennas ur vlevenn, un ivinenn, hag a droc’has gorre he dorn da ouzhpennañ un tamm kroc’hen.

– *Evit ma c’hello an Ankoù kavout an elfennoù-mañ e don donañ an eneoù steuziet.*

– Un draig c’hoazh... a ouzhpennas Magdalena mil enervet. Stlepel a reas ur spilhenn er gaoter, ha Sally a grogas gant al lenn a vouezh uhel. Ne daolas ket evezh ouzh klemmichadennoù he zad hag hec’h amezeien. Judi a chome mut, fiziañs he doa enni. Dres ar pezh a domme he c’halon.

« *Eus bed an Anaon e tistroio*

Gant e ene glan ha goullo

Ankoù, Ankoù greomp an eskemm,

Ar spilhenn zir gant ho falc’h lemm

Ma c’helloc’h stagañ en-dro

Korf ha spered an den marv »

A-feur ma tibune ar bedenn e c’hwezhhas korventenn el labourva. Ar meskaj a vervas a-vervbras. An aezhenn deñval a aloubas al lec’h, oc’h embann blaz c’hwerv e beg pep hini. Korf Viktor Valerius a savas diwar an daol operata en ur vran-sigellat, diaes dezhañ kavout ar c’hempouez gant e gorf krouet diwar gwazed liesseurt. Da bep gwask kalon, e teue livioù ar vuhez war e groc’hen glas-gwer.

Kerkent e anavezaz e zousig :

– MAGDALENA. Ho karout a ran dreist ar marv ha da viken.

– Viktor... a huanadas-hi, o briata anezhañ gant startijenn. O Labousig, nag a amzer gollet...

Stardañ a rae anezhañ, hag eñ a starde anezhi, gant teneridigezh, ha feulster, pa gasas e zaouarn tro-dro d’he goûg. En ur bokañ d’he zal e krouge anezhi.

– Droug a rez din, karedig.

– Ne c’hellan ket mirout, ma dousig. Ma daouarn ne sentont ket d’am c’hoantoù, fiñval a reont gant nerzh... gant nerzh an neb en deus o douget araozon. Ha ma zreid a glask achap war an tu kontrol !

Diaesterioù he doa Magdalena da analiñ.

Mantret e oa gant ar c'hwitadenn ma oa an dro-hud, rak fulor Bomparquet hag ar re all a oa o tremen dre o izili. Rannet e oa he c'halon. Ken pell he doa gortozet anezhañ !

– Da garout a ran, a lâras-hi oc'h en em zizober a-etre krabanoù Viktor.

Krapat a reas war he den-bleiz doñvet da achap, betek klevet Gling ar bignerez. He femp gwaz, al liorzhour, paotr al lizhiri hag an aotrou Bomparquet en em gave dirazi, evel ur voger na lezfe ket anezhi da dremen. Nemet e oant nammet. Na marv, na bev, kuitaet gante bez Valerius.

Evel-just n'he doa ket diwallet p'he doa dibunet Sally ar bedenn evit an eil gwech.

Met an trec'h en em gav alies dre draoùigoù dister. Dre ar munudoù. Ken eürus ma oa-hi da welet he c'haredig, n'he doa ket klevet e oa cheñchet ar strobinell, dibunet el liester.

« Eus bed an Anaon e tistroio

Gant eneoù glan ha goullo.

Ankoù, Ankoù greomp an eskemm,

Ar spilhenn aour gant ho falc'h lemm

Ma c'helloc'h stagañ en-dro

Korf ha spered an dud varv »

Ar re o doa karet anezhi a oa distroet. Trubardet ma oant bet, ne oant ket distroet evit he lakaat da zañsal. Muzelloù limestra gante. Holl bet ampoezonet. D'unan e vanke ur c'har, d'an eil e vanke e organoù, hag egile a strane war al leur, dizreid. Gary a oa izel e lost a-dal dezho. Magdalena a huanadas. He daouarn war he dargreiz, un troad o skeiñ war al leur. Gouzout a rae e oa trec'het.

– Lezit anezhi da dremen, mar plij ganeoc'h, a lâras Sally dezho, hag int-i ha sentiñ evel pa vije bet o mestrez.

Ar wrac'h war he c'hi divent a skoas gant he zreid war daougostez Gary da reiñ tizh dezhañ, met hennezh ne gredas ket tec'hout.

Sally a lamas he eil botez d'he hejañ dindan fri Gary hag he stlepel a reas war-zu an diavaez. Hennezh a redas war he lerc'h. Setu penaos e tec'has Magdalena, war he c'hi divent, hep treiñ kein, o lezel war he lerc'h margodenn diroll he dug. Sally a gouezhas war al leur, kollet he holl startijenn ganti. Gwenn e oa he blev abalamour da nerzh an huderezh. An aotrou Poultrouilh a gemeras anezhi en e zivrec'h. Sklaset e oa he zreid.

– Riv am eus.

– Stammañ a rin loeroù dit, ma merc'hig, a respontas o stardañ anezhi ouzh e vruched pegus goloet gant lipig



Dibenn an hollsent

Adalek an nozvezh igromañserezh a zegouezhas 13, straed ar skav-gwrac'h, e voe kontet d'ar vugale hag a rumm da rumm e teufe ar wrac'h Magdalena da gerc'hat ar re na oant ket fur.

Ma oa eus ur strobinell da zihuniñ ar re varv, ne gavas Sally doare ebet da lakaat anezho da huniñ en-dro. Setu penaos en em gavas gwazed nammet o lojañ er savadur.

Ur c'houkva a voe graet evito e ranndi an amezegez tec'het. E gwirionez e oa ul loch kentoc'h, rak ne oant ket eus ar re a gouske. Ne seblantent ket prederiañ kennebeut. O jestroù a oa simpl, ha dre ma oa tec'het Magdalena, ne oant ket entanet ken gant ar c'hoant d'en em venjiñ.

Gant se e oant dinerzh, met gouest memestra da seveniñ un nebeud oberennoù eus ar re simplañ.

An aotrou Poultrouilh a dennas gounid dioute evit ober e vicherourien anezho. Graet en doa ur re loeroù d'e verc'h, ha dilezet e gounsoner evit kemer e karg an embregerezh loeroù dilezet gant ar sorserez kozh. Krouet en doa ardivinkoù ha benvegoù a glote gant o barregezhioù. Livioù ar joa a sklêrijenne en-dro tresoù an aotrou Poultrouilh.

Desket en doa dezho, o kemer kalz amzer, penaos gwriat ha stammañ, heuliañ ar patrom, dibab mat al livioù.

Sally a dremene alies da reiñ an dorn gant banneoù evit pep hini. Ne gouskent ket, n'o deveze poan ebet : micherourien efedus. Met graet e veze war o zro gant aket.

War he zresadenn adal d'ar gwele he doa ouzhpennet zombied evit klokaat he foltred familh. Niverus e oa he breudeur, evit he brasañ levez. An aotrou Bomparquet, ne glaske laou ken dezhi. Skoazellañ a reas anezhi pa ginnigas ur patrom gant ar re loeroù a felle dezhi profañ d'he mignonez. Tapet he doa ganti ar pleg da sikour pa wrie e zorn e plas ar pezh-dilhad. N'he dije ket soñjet e c'hellfe un deiz bennak magañ an disterañ karantez evitañ, ha padal e oa kemmet he santimantoù. An dud a oa tonket da cheñch.

Karantez Magdalena evit he dug avat, ne oa ket bet cheñchet a-dreuz ar c'hantvedoù. Marteze e tistrofe da gerc'hat e benn, piv 'oar, met erruet e oa kozh-Noe. Peurlipet he doa an died a yaouankiz alejet gant e servijer leal, a servije neuze da ginklañ kambr Sally.

Un nebeud deizioù a-raok an distro-skol he doa-hi merzet ur cheñchamant e rannidi ar re Van Oplossing. Bremañ ma oa renket afer Milligadenn ar gêr, n'o doa mui 'met dilojañ evit an tregontvet gwech, da glask war-lerc'h kevratoù all.

Met e plas talañ ouzh euzhviled e oant en em lakaet da glask kompren boudoù na oant ket ken disheñvel dioute. Krouiñ a rejont neuze an O.B.D, Ofis ar Boudoù Dreistordinal, evit skoazellañ anezidi divoutin Kerlutig, ha brud a oa warno gant ar frazenn « Amañ e kavomp diskoulmoù, gant gerioù pe arbalastroù ».

Sally a bareas Fidelio gant sikour ur rekipe hud, a lezas ur roud da viken war he c'horf. He lagad dehoù a valee en e boull en un doare dizalc'h.

Touiñ a reas d'he zad e chomfe al levr serr, dindan e chadenn bonner. Met desket he doa tennañ karotez, hag ur wech an amzer, e rafe ur strobinell pe ziv evit he flijadur.

War porzh ar skol e rankfe diwall da embann

he c'hevrin ; rak piv 'oar peseurt doare euzhvil a oa ganti en he c'hlas ?

Pa c'houlennas he fenngelenner ar vicher a vefe he hini, e respontas « parañ al loened ». Neuze e kuzulias dezhi labourat start er skol evit gellet ober studioù uhel ha kas he hunvre da benn. Displegañ a reas koulskoude n'he dije ket ezhomm : kalz efedusoc'h e oa an huderezh.



Peurvoullet e-ti Roudenn Grafik, 22200 Gwengamp
Disklêriet hervez lezenn e miz Here 2020